

no 104

ABREGE

DEUS A

HISTOAR REVOLUTION FRANÇ,

LAQUET EN GUERS

GANT

AN AUTROU LAY,

Person Perros-Guirec,

En pad he exil en Bro-Saoz.

*Convenerunt in unum adversus Dominum
et adversus Christum ejus. Psalm. 2*



944-
106
LAY

EN GUENGAMP,

Eus a Imprimeri Y. TANGUY.

1839.

D'AL LENNER.

An Autrou LAY a voa guinidiq deus a Loquirec, tref parous Lanveur, en escopti Dôl. Goude bezan gret eur studi gaer en scolach Landreguer, ec'h antreas er c'hlerge hac e c'honezas istim hac admiration an ôll dre he eloqanç hac he vertuziou.

En assembleou diarauc ar Revolution, e ræs allocutionou hac e roas avijou pere a voe profitabl meurbet d'ar veleien all; ha pa deuas tan ar revolution da flammman, e presegas d'an ôll ar peoc'h hac ar garante, ha, bep'et fidel d'he gonsçians ha da Zoue, e partias evit an exil, en eur recommandi dreist pep tra he scrijou d'he vates. Homan, pelhini a voe ordrenet dezi, hep dale, gant soudardet a ræs disquennou en ty ar belec exilet, da rei deze caierou he mestr, gant aon ne vije casset dirac tribunal ar revolution, da laret eo, d'ar maro, a zizouas aneze hac o roas d'ar soudardet. Casset e voent da Zistriq Lannuon, en pelec'h e voent disperset pe distrujet, evit lavaret guell.

Chom a ra c'hoas, couscoude, unan bennac deus he sermon, niou en mesq beleien Breiz-Izel, ha mar-g-hellomp, un de, bezan evurus avoalc'h evit o c'havout, e laqoimp o'impriman hac o zistribui en touez ar Vretonet, o sonjal ober, dre guement se, plijadur evite.

Bezan a so c'hoas en buez tud coz pere o deus sonch da vezan clevet ar belec santel-man o sermon, hac a gomsont anezan evel deus a un den an admiraplan.

Queit a ma chommas en Bro-Saoz, goude bezan bet forcet da guitat Franc evit savetei he vuez, e seblante bezan un tel a consolation digasset gant Doue memes da soulaji ar brissonnerien ha da rei deze sicour evit souten eur vuez an tristan.

Abalamour da se, e chomme en o c'hever en castel Porches-ter, tost da Bortsmouth, bep'et occupet da glasc ar moyennou da brocure deze un douder bennac.

Ar gonder-se en devoa gonezet dezan carante ar c'hommisser, hac evelse, pep devez a voa merquet deus a eur vadelez bennac evit ar brissonnerien. He garante evite a ie bete pidi ar re a chomme tost d'ar prison da rei deze labour da ober, evit ma hellfent gonid un dra bennac, ha dre enon e tenne varnezan mil ha mil benediction.

Diocèse de
Quimper & Léon
Document numérisé en 2016

Quen bras, quen ardant e voa he garante evit he vam-bro quen, en queit a ma voa en Bro-Saoz, e scuisse he daoulagadous o derc'hel troet varzu ar Franc, hac o scuill daerou betec ar moment evurus en pehini ec'h ellas c'hoas laqat he dreid yar douar Breiz-Izel.

Anfin, o vezan an dranquillite retornet en Franc, ar pastor santel-man en em rentas deus ar re guentan en he vam-bro, hac ec'h arruas en Perros, ar 14 a vis gouere 1801. An Autrou Caffarelli, escop a Sant-Briec, a felvezas dezan en cavout da viquel vras; mas an den venerabl-man a voe guell gantan distrei en touez he *zenvedigou*, evit achui eur vuez pehini a voa bet carguet a vertuziou hac a groasion, ar pez a accordas an escop dezan gant an titr a viquel vras a enor.

Arru en he barrous, o vezan gret eur c'hlenvet hir hac ous en em velet tost d'ar maro, e laqas diguemen unan bennac deus he baroussionis, evit ober he guimiadou divezan deze. O fidi a eure d'en condui d'an ilis, en pelec'h, en despet d'he do-c'horiguez, e ræs he beden hac e visitas an auteriu, ar fong-vadeiant hac ar gador-sermon. Mantret e voa an oll gant ar glac'har ha beuzet en daerou, o guelet anezan o pidi Doue a galon, en he dempl, allas! evit ar vech divezan. Neuse e c'hoantaas bezan conduit d'ar veret, hac arru enon, en eur disgoen eur certen lec'h, e c'houlennas ar faveur da vezan in-terret ennan. — Pellaet, emeze, autrou person, ar sonjesonnou trist-se deus ho speret. — Ma bugaligou, emezan, ma maro n'hell quet daleout : yar c'hoas ma c'horf paour a vo astenet aman, ar pez a c'hoarvezas evel en devoa lavaret.

En eur antren en he dy, e pedas he berson da rei dezan he sacramanchou, ha, goude ar ceremoni, ec'h adressas eur goms bennac d'an assistantet, hac e rentas he ine d'he grouer ar 14 a vis here 1802. — Heuillomp, lenner ma mignon, heuillomp, en quement a ma vo possubl d'imp, an exemplou mad en deus roet d'imp ar belec santel-man, Miromp bete fin hon huez ar fidelite d'ar guir Doue, evit ma hellimp, goude bezan bet eprouvet eveltan gant trubuillou ar bed-man, mont da velet anezan dirac daoulagad an Autrou Doue, en gloar ar barados.

Amen.
Conscriptil sermones rectissimos ac veritate plenos.



CANTICO

VAR AN ANNONCIATION.

Var don : *Jesus, heman eo ar guir charmant.*

1.

Caëroc'h vit ar stereden vintin,
 Pa bares bars en Orient,
 D'annonç d'ar pilot leun a chagrin
 Ar fin deus un nosvez tourmant;
 Mari, leun a c'hiraç hac a c'henet,
 Oll agreabl dirac Doue,
 A annonç dimp ez eo tremenet
 Reus Satan hac he drouq æle.

2.

Dimeus ar palæs celestiel,
 Abeurs Doue oll-buissant,
 Eo deputet an æl Gabriel
 Evit eur sujet important;
 En touez ar sperejou evurus,
 N'en devoa biscoas admiret
 Vertu na graçon quen precius,
 Evel er Verc'h a Nazareth.

3.

Salut d'ac'h , emezan , ha respet ,
Guerc'hes evurus , leun a c'hraç ,
Abeurs an Dreindet a adoret
Pehini'n ho petec em digas ,
N'ho pet nep spont ; ennoc'h un Doue ,
Charmet dimeus hoc'h innoçañ ,
A disquenno an deiz a hirie
Evit ober he zemeurañ

4.

O crouadurez leun a verit !
A dle concev , a dle guenel
Eur map a vajeite infinit ,
A vo hanvet Emmanuel.
Doue memes , ar Speret-Santel ,
Ar memes Doue eveltan ,
Dre eur buissañ dreist-naturel ,
A dle ober ar miracle-man.

5.

Chetu aman , eme ar Verç'hes ,
Messager fidel da Zoue ,
Chetu aman he servijeres ,
Prest da ober he volonte.
Ra vezo gret bars em andret ,
Herve an urjou souveren ;
O guir brás ! dre behini eo formet
An hini a grouas an den.



REFLEXIONOU CHRISTEN

VAR

REVOLUTION FRANÇ.

Super flumina Babylonis, illic sedimus et flevimus, cum recordaremur Sion. Ps. 136.

P'eur eta , ô ma Doue , e teuyô an termen
Ma velin c'hoas ma c'hontre , dôuar ar Francisien !
Ma c'horf so pell dioute , mæs nos-de ma speret ,
Gant quement o deus gret din , a sonch enne bepret.

Pell amser a so deja ma'z on deut da Vro-Saoz ;
Pa zezir cals ar galon , e scuizer o c'hortos ;
Ha n'em eus nep esperañ da dremen c'hoas ar mor !
Allas ! en Franç ne souffrer na belec na pastor.

Azezec voar eur garrec en tal bordic an od ,
Lies a vech an daerou a red var ma diou jod ,
Pa velan reus ar pec'het hac hini ar muntro
Hep na fin na chanchamant o ravaji ma bro.

Truezus eo ma doare ha pitoyabl ma stad ,
Chasseet deus ma c'hontre ha collet ma oll vad ;
Mæs ar chagrin am zavor eo clevet a bep tu
Ar feiz , ar religion en Franç a so achu.

Ah ! ma maleur ma-unan a ve neubent a dra ;
 Mæs hini ar gristenies ! hennes eo a laqa
 Da redeq voar ma diou jod eur feuntent a zaerou ,
 Pa sonjan en abandon eus ma zenvedigou.

Ne allan quet en compren , eur bopl quen gracios ,
 Quen poli , quen amiabl , guechall quen vertuzus ,
 En quen neubent a amser en defe collet cren
 Bep santimant a enor , guirione he greden.

Da zizamman ma c'halon em eus sonjet canan ,
 N'em eus gret nemert essa , bep noten e fazian :
 Rac en eur vro estranjour , ma zeod stag ous ma staon ,
 Ma oll rimou so chanchet en canticou a gaon.

Dre agrement ar rimou , eur mouez melodius
 E deus calmet alies sperejou furius ,
 Ha tennet huanadou deus calon eur mechant
 A vije bet goal diæs da c'honid autramant.

Mar fel d'ac'h-hu soulaji eur buguel a so clan ,
 Invariant eur rimastel , canet eur son dezan ;
 Laquet gant legerete mel ous bordou an tas
 Hac ec'h evo ar remed hep ma santo ar blas.

En dezir-se , ma brois , em eus gret ar vers-man ,
 Evit essa ho conid ; mæs na ouffen canan ;
 Avoalc'h eo d'in rapportin , clasquet un all an ton
 Abominationou ar revolution.

Voar bes ton , ô ma Doue , e canfen-me breman
 Maleuriou , sacrilejou , crimou an eusussan !

Ne gredfe den o c'hanan nemert an nep o græs ,
 Ha memes ous o riman a fontan gant ar vez.

Tonniou ceder ha touchant , pellaet eus ma memoar ,
 N'eman mui amser ar joa , mæs amser ar glac'har :
 A bep coste ne glevan nemert son an tocsin ,
 Trompill ar bresel civil ha trous ar guillotin.

Ne velan nemert monstrou dirac ma daoulagat ,
 Franç goloet a bennou ha rivierou a voad ,
 Dre oll o tivoguedi : an oll so , dre valeur !
 Gourvet en squeud ar maro , hac o c'hortos an heur !

Voar goms tud veo a grimou , e reder d'an ifern ,
 Evel pa ne ve na corf nac ine da espern ;
 N'en deus chommet en dilerc'h insolanc ar pec'her
 Crim ebet da gomettin na torfet da ober.

O mez ! o confusion ! adversoures ar c'hrim ,
 Dibab d'in comsou piqant , condu breman ma rim ;
 Gra d'ar Francisien rusian , ha divar o diou veus.
 En em zil en o galon , ha ro d'ê eur guir gueuz.

Santimanchou a remors , deut en o ineo ,
 Mæs hep o disesper , rac Doue da viro !
 Roet daerou d'o daoulagat , neuse gant confianç
 Me essao o distrei , hac a ia da gommenç.

Quomodò cantabimus in terrâ alienâ ? Ps. 2.
Adhæsit lingua mea faucibus meis. Ps. 21.

ABREGE

DEUS A GRIMOU AR REVOLUTION.

*In terrâ polluerunt tabernaculum nominis tui.
Dixerunt in corde suo, cognatio eorum simul: quiescere
faciamus omnes dies festos Dei à terrâ. Ps. 73.*

Quent commanç da damal den, en em gondaonomp oll ;
Râc dibaot eo an hini n'en defe gret he roll
Da dennan maleur he vro, darn evit dominan ,
Darn evit en em venji, darn all evit pillan ;

Darn all, hac an darn vuiân, so manquet d'o dever ,
En default en em oppos. er c'houls hac en amser :
Ne raent nep resistanc, gant aon, emezê,
Da goll buez ha madou, hac o c'holl, couscoude.

An dud mechant a ziscoen, pa ve drouq da ober ,
Art ha courach an ifern ; mæs james nê veler
Vit difen ar virione ar memes interest
Nac ar memes union en touez an dud honest.

Nombr ar re-man ordinal so bian en pep bro ,
Hac en Franç ispicial, un neubent amser so ,
Ne rét nemeur a istim deus a lesen Doue ;
Ar feiz a ziminue visiblamant bemde.

Eur societe secret deus a dud dipreder ;
Hanvet ar framassonnet, a zalc'he en peb quær
Assambleou danjerus ha leun a brejudic
Da droajou ar rouane ha da re an Ilis.

En nos en em zastument evel sorcerien ,
Neubent avoalc'h da guentan, mæs, goude, o banden
A voa er rouantelez cresquet en eur feçon
Ma voa dibaot ar c'hlubist ne vije framasson.

Re a speret so noasus, pa ve goall impliet ;
Pell so ar scrijou infam deus ar phitosopphet,
Contrel d'ar religion ha d'ar gouarnamant ,
A bresegue ar viçou hac an debordamant.

Levriou quen pernicious a voa lennet partout
Gant mall ha gant plijadur ; d'an oll, herve o gout ;
E tebitent maximou impi ha ridicul ,
Hac erfin en em gavet, hep sonjal, incredul.

An darn vuian an noblanç n'o devoa nep studi ,
Hac ar gommun ignorant, evit en instrui ,
En defoa tud a justic, raç experimantet
En art da livan guevier ha da billan ar bed.

Da c'honid al labourer so plantet en he ben
Ne baeje deog na cargou na redevanç da den ;
Ne vanque mui d'ar revolt nemert clewet en temp
Un intru-ous he freseq hac o rei an exempl.

An Ilis a remerque ar bar-man o tostât ;
Mæs an incredulite deus he avijou mad

Ne re nemert caquetal ; an oll a voa dallet ,
Ar gouli a voa daro , ar gor a so crevet .

Ar memes pech a dias ar bopl hac ar roue ;
Rac eur ministr heretiq , o fiout ennan re ,
A gonvoqas d'ar Stadou , non pas evel guechall
Tud-chentil , tud a enor , mæs eur vanden tud fall .

Clasq an tu da acquittan dle ar rouantelez ;
Sicour ar princ da laqat ar bopl tout en æz :
N'o defoa quen quevridi , en gouieguéz an dud ,
Var ar c'hrimou da ober e voant secret ha mud .

Taer assamble en Paris , an eil varlerc'h eben ,
Dangerussoc'h d'ar c'hontre evit an taer goalen ,
Tud incapabl da c'houarn , mæs habil da deceo ,
Var digare reformin , o deus collet ar vro .

Dispartian ar roue deus he sujedet vad ,
An ezezh deus o groague , ar buguel deus he dad ,
Ar pastor deus he zenvet , ha Doue deus an oll ;
Dre enon , ma brois paour , int commancet d'ho coll .

Fouillan , confisqan madou , ober goal dretamant
D'an noblanç ha d'ar c'hlerge , o accus faussamant ;
Disarmi an dud honest , institui clubou ;
Ne veler , ne glever quen decretet er Stadou .

Quement a zisplich deze , hep sujet na réson ,
A ve ractal conduit d'an arrestation ;
Pautr ha plac'h , nobl ha partabl , ar famillou a bez
Ha pa ve leun ar prison , casset d'ar guiguerez .

Quellies a antéchrist int , sivoas ! me a gred ,
Dislonquet gant an ifern da hastan fin ar bed ;
D'en zamman a vaspheumon , d'en golo a viser ,
Hac erfin da distrujan an trôn hac an auter .

Gopret o deus canailles da vezan fals testou ,
Da suscitan ar revolt , da danan noblançou ,
Da billan , voar digare un accaparamant ,
Magasin ar marc'hadour , grignol ar paysant .

Prodiga voad o breudeur , gant un ourgouil barbar
E tiscleriont ar bresel d'an env ha d'an douar ,
Hac o c'hortos ar vocen , eo gante , dre avanç ,
Laquet deja ar famin en rouantelez Franç .

Prononcet eo an arret , ha formet ar c'homplot ,
Red a vo da Louis c'houezec pignal var ar chafot ;
He c'hrim eo he vadelez , he setanç ar maro :
En tribunal ar bleizi an oan a berisso .

Me vel deja ar victim conduit var ar plac
Divisq en corf he rochet , he ben royal en noaz ;
Gant eur visach gracios hac a greis he galon ,
E ro c'hoas d'he bopl ingrat mil benediction .

Son a rer an tabourin aon ne ve clewet
An adieu carantezus a ra d'he sujedet .
Savet eo an instrument , hac ar gontel a goue ! ! ! .
He ben a ia d'an douar , hac he ine d'an ée .

Deut arauc , tud arraget , avancet , judevien ,
Da velet c'hoas an den just evit he vourrevien ,

Victim deus he vadelez, ober ar sacrific
Deus he vuez precius; mervel!! Adieu, Louis!!!

Evel-se'ta e trêter map an duques Anna,
Roue mad, mignon fidel, an den an honesta!
Biscoas da gondaoni den he sin n'en deus roet,
Nac ive var ar maro biscoas n'en deus sinet.

Pebes fin, ô ma roue, goude dastum ar vro,
Evit goulén he avis ha selaou he c'hlemo!
Gant guir dezir da rentan justic da bep hini
N'oc'h eus evit recompanç nemert eur maro cri.

Ne gredan quet, Francisien, o pije roet carg
Nac urz d'ho teputeet da lazan ho monarq;
Mæs lâch oc'h bet d'en difen, ha tout, bras he bian,
Me ho cielo hep dale maleurus hoc'h-unan.

O differi punissa revoltiri tud fall,
Oc'h eus collet ho puez ha millionou re all;
Re a zouster alies so goas evit rigneur,
Hac un taul autorite a arret mil maleur.

Goude un torfet quen bras, ar rest deus ar c'hrimo
A gommeter divorc'het: mil ha mil a varvo
Dindan ar fals muntrez; maleur da biou-bennae
A so en Franc pinvidiq, pe nobl, pe christen mad!

Pourmen a rer dre ar vro instrument ar maro
Da dibennan Francisien: gar an nep a garo.
Evit merq a *liberte* tout an dud a *forcer*
Pe da vervel er bresel, pe da vervel er guær.

Crimou all so da ober: evit rentan an oll
Hardioc'h d'o c'hommeti, promptoc'h d'en em diroll,
E renonçont assambles dre eur sermant publiq
Da religion o zud coz, d'an Ilis catholiq.

Preseq mui lesen Doue a ve risqan ar goug;
Rac ordren a ra pep mad, difen a ra pep drouq;
Red e ve restitui he vadou d'an nissan,
Ha n'eo quet se a glasquer, mæs ober pep goassan.

Rac-se ous ar veleien ema'r brassan furor;
Ma ne reont ar sermant, ha prelat ha pastor,
Oll e vint exterminet, ha, mar prestont al le,
Int livret d'an disesper, d'ar vez, d'ar baourantè.

Quement sort calomniou a heller da sonjal,
Traou impossubl da gredi a glever da damal
D'ar re santelan memes deus an dud a ilis,
Evit laqat ar gommun da gaout oute maliç.

Ar baroujou eur veach privet a veleien,
An Ilis a vo pillet, ar bopl n'en devo den
Capabl pelloc'h d'o c'helen, na da ziscoen dezo
Ar precipic a valeur a gleuzer dindané.

Cetu ase ar myster a glasquer da guzat,
Al le so un digare; mæs gout a rer erfad,
Pa ne sonjer da ober nemert pep fallente,
Tud a ilis en eur vro a ve bepret a re.

Ar guær daonabl a Baris a ro dre gonsequant
Ar signal da arrêti en pep departamant

An oll glerge catholig : urz ar gonvansion
Eo suscitan'n o enep ar bersecution.

O ministret an Ilis, c'houi oll, pastoret mad,
Prest eo ar gurunennou ! digor eo ar gombat.
Quimiadet deus ho tenved hac antreet en liç :
Ho puez a c'houlenner breman en sacrific.

Quent affronti ar maro, servijerien fidel,
Heuillet bepret gant prudañ lesen an Aviel.
Persecutet en eur plaç, clasquet eur refuch all ;
Util ec'h alfet bezan martese en plaç all.

Mæs pelec'h ec'h efet-hu arauc hoc'h adversour ?
Franç n'en deo carguet breman nemert a dud traitour ;
Guerset oc'h tout en avanç, me vel tregont diner
Offret d'ar c'hentan Judas a lago ho quemer.

Clasquet en tu ma querfet eur plaç a savete ;
Allas ! nemert er c'hoajou en mesq loënet goue,
N'ho po pelloc'h quen repos : ne gredfe den ebet
Rei d'ac'h un nosvez memes eur c'horn deus he oalet.

Red e vo souffr dienes, ha naon ha sec'het,
Cousquet ermez alies ; mæs en em gonsolet :
Jesus na veve ive nemert a alusen,
Ha n'en defoa plaç ebet da reposi he ben.

Pebes buez, ma Doue, mæs ne bado quet pell :
Dre oll e voar o foullan, n'eo quet possubl tec'hel.
Arriout ra beleien dre gargon d'ar prison,
Staguët, treinet, insultet hep nep compassion.

Guelet ho pige neuse pastoret venerabl ;
Griset gant ar binijen, ereet o daouarn sacr,
Da santelez an Aviel o rentan testeni :
Enor a guevont mervel ; ec'h er d'o exauci.

Nombr a so a vourrevien, cals a ia d'ar maro,
Non pas hini a hini, mæs a vandennado,
Bete pemp, c'houec'h cant belec, en Paris, deiou ve,
A vassacer balamour ma tifennont ar fe.

N'en deus na form na proces diarauc ar supplic :
Pep bourreo en he gartier a vassacr en he c'his ;
Assommi, beuzi, tennan, diframman a bejo,
Ilac ar rest, scuis o lazan, exiler deus o bro.

Enord'ac'h, tud ma c'hontre, n'endon pelloc'h quen trist-
Pourvei a ret merzerien da Ilis Jesus-Christ.
Plijet gant Doue, outraget dre quellies a grim,
Ho pardonni en faveur quellies a victim.

O merzerien evurus ! m'em eus avi ouzoe'h ;
Perac n'em eus-me'n enor da vervel eveldoc'h !
En draonien-man a c'hlaç'har pegueit e chomia-me ?
P'eur deus prison ar c'horf-man e vezin-me pare ?

Ma ne rer d'in goulou evit scuillan ma goad,
Me en chencho en daeron, ha, dre ma daoulagat,
Evit ma merzerenti, bete'l lom divezan,
Da galmi coler Doue, me rayo en scuillan.

O Religion santel a Jesus, ma Doue !
O tron meurbet venerabl ! o Bourbon, ma Roue !

Abaoue daouzec cant vloas ma voac'h guenimp o ren,
E rec'h consolation ha gloar ar Francisien.

Mæs tremenet eo amser ar peuc'h hac ar justic !
Franc, ma bro, n'en dout pelloc'h nemert repu ar vic,
Lazet ec'h eus ta roue, ha renoncet d'ar fe,
Er bed oll e tetester ta vaximou ha te.

Dalec lec'h ma sav an heaul bete plac he gousquet,
An hano sacr a JESUS a so glorifiet,
Ne adorer quen Doue nemertan en Europ,
Franc he-unan so paian, Franc a so huguot.

Na da goz, na da yaouanq nep instruction ne rer ;
Hini ar sacramanchou pelloc'h ne receiver ;
Exceptet ma eureuger gant eur municipal,
Evel ma tiseureuger, pa deu eur sore'hen all.

Ne gredfe den en publiq lavaret he Bater,
Nac ober sin ar c'hristen, pe sur en denoncer :
Rac eur guir republiqen so un den possedet,
Couezan ra en barriou, pa vel treou biniguet.

Pillan rer an ilisou, brisan imajou'r Sænt ;
Bete be ar re varo, oll emaint var o hent :
Eur c'hloc'h hepquen so miret evit son an alarm,
O Doue, rêson o deus ; sonnet-an d'an daoulam.

Evit ne vo quen mergou deus ar bloas nac an de
Ma c'hanas ha ma souffras evidomp map Doue,
St gret eur c'halandrier ne hell den he entent :
N'en deus na mis na seson he hano diagent.

Ar sul, an de precius, quen ancien hac ar bed,
Gouel consacret ha berset, memes gant an Dreindet,
So substituet dezan, evel d'an oll goueliou,
Solenniteou mezus, hanvet an *decadou*.

Ar goulou hon egare en nos deus ar pec'het,
Orgouil ar speret humæn a so diviniset ;
Templ ar furnez eternal, an ty a orêson,
A so gant tud insanset dediet d'ar Rêson.

Divar drôn he garante eo lancet Sant ar Sænt
Gant dorn an apôstasi, hac ar c'hlabou querquent
O deus fixet en Ilis o assignation ;
O abomination an desolation !

Evit petra quellies a brofanation
A ve horreur da gontan ? Perac an abandon ?
An Ilis so polluet, ornament, levr, calei,
Eet int oll, rac ne gonter pelloc'h offerenni.

Mouguet eo'r goulou el lamp ha brusunet ar groas
En Ilis hac er verret ha dre an hentchou bras,
Abroget eo'n Aviel, ne vo preseguet quen
Nemert doctrin Lucifer, hanvet *droajou an den*.

Da c'hortos rei da gredi n'en deus Doue ebet,
O deus chanchet he hano, ha breman, me a gred ;
Hac er sans ma ententont eo anat ar blasphem,
En plac laret an Dreindet e lerer *Etr-suprem*.

Laquet eo var an trebe crim an idolatri,
N'en deo pelloc'h ar C'hrouer a so da adori ;

Mæs soutilou ar Rêson, eur vezen, eur bonet,
Diviniteou femel n'o deus pouvoar ebet.

Savet eo'r yeot en hentchou, Sion so glac'haret,
Ne deu den en deïou dign d'an templ, eme'r prophet,
Allas ! d'imp-ni eo goelan ; ar guir Doue en Franc
N'en deus quen na sacrific, nac auter, nac ezañ !

Dre eur miracl estonus deus a justic Doue,
Omp couezet en nos teval deus an impiete ;
Ha mar digor he galon da rei d'imp c'hoas support,
E vo red eur miracl all deus he visericord.

Pardon, pardon, ma Doue, me a zoug em ine
Hoc'h imach, hac em c'halon un templ d'ho majeste.
Enon me rai d'ac'h bemde mil amand a enor,
Pa ne gavan d'o ober an ilisou digor.

Ne gollet quet, ma Jesus, en touez an dud mechant
Eur bopl bras a Francisien, pere d'o badeiant
So fidel c'hoas a galon, hac a vel gant horreur
Hep gallout en em oppos, oll grimou o breudeur.

Excuset-ê, ma Doue, mar requetont ar foultr
Da gouezan visiblement ha da laqat en poultr
An hugunodet impi. Allas ! ne ouzont quet,
Pa ve brassan ho coler, ne ret seblant ebet.

Convantion milliguet ! Ar vech-man, m'en assur,
Na helles quet mont hirroc'h : barret eo ar musur ;
Gortos ta bunion, n'ec'h eus quen da ober,
Doue so just ; he receo a ri en ber amser.

Gra entretant vanteson d'ar bopl frenesiët
N'ec'h eus leset nep abus n'ec'h eus-an reformat :
Pa laques an Aviel en touez an abujou,
Guenet ar vertu so viç, ar virione so gaou.

An dud so c'hoas da c'henel o devo poan credi
Extravaganç ta grimou ; mæs me hell assuri
Ha quemer evit testou an douar hac an êe
N'em eus quet c'hoas rapportet an drederen anê.

Mæs el lec'h en em dale da ober eur recit
Deus a guellies torfet, me ia breman dre scrit
Da laqat guirioneon ha rêsonniou patant
D'ho tennan, ma brois paour, deus hoc'h egaramant.

Red eo d'in var pep gouli appliquan eur remed,
Despeigni d'ac'h ar monstrou o deus bet ho tromplet,
Hac ar maleuriou nevez a dleet da c'hortos,
Ma n'ho pe quet a gourach avoalc'h d'en em oppos.

Quantan em eus d'a ober eo ho tisabusin
Deus bavardach tud mechant o deus gret, a sonch d'in,
Marc'had gant an drouq-speret ha pact da renian
An Aviel a gredas an oll bete vremen.

Ne c'houlont quen sclerijen evit o c'hondui
Nemert hini ar Rêson : demp'ta d'he c'honsulti ;
Examinomp eur veach, hep ober dei affront,
Petra lavar ar Rêson, ha pegueit ec'h ell mont.

*Gentes, quæ legem non habent, naturaliter ea, quæ legis
sunt, faciunt.... Ipsi sibi sunt lex.... Testimonium reddent
illis conscientia ipsorum, et inter se invicem cogitationibus
accusantibus, aut etiam defendentibus. Ad Rom. 2.*

QUENTAN GUIRIONE.

EXISTANÇ DOUE.

Vani autem sunt omnes homines, in quibus non subest scientia Dei: et de his quæ videntur bona, non potuerunt intelligere eum qui est. Sap. 13.

Biscoas pobl civiliset, nemert ar Francisien,
N'en devoa imagnet ober d'an dud tremen
Hep nep sort religion, hac o fersuadi
Eo ingal caret Doue pe dont d'en outragi.

Nemert en Franc ne glever langach tud reneet,
Brutal avoalc'h da gredi n'ez eus Doue ebet:
Corf hac ine, emezê, e varver assambles;
Evit an innoçantet eo gret ar gristenes.

Un den savet er scol-se, a lazo hep remors
E dad, e vam, e bried, pa'z eo guir ne ra fors
N'eus barados, nac ifern, na vertuz, na dever;
Ne chommo crim he zilerc'h, na torfet da ober.

Ne vo quen eus en derc'hel nemert droajou an den,
Decrejou impuissant, ordrenançou païen!

Grêt gant tud hep qalite, fallôc'h tud evita;
Mar-g-hell cuzat he grimou', ne risq eta netra.

Da refuti blasphemou eur sort huganodet,
N'en deo quet red, ma brois, mont da glasq doctoret:
Ar sans-commun a lavar d'an oll eus un Doue,
Ha conscianç peb-hini a brouv eus un ine.

D'abord, en quement contre na bro so habitet,
El lec'h ma poas an domder, el lec'h ma frim bepret,
En touez an dud sauvachan e veler couscoude
Un anaoudeguez bennac deus an Divinite.

An dud a goll er bed-man sonch deus a guement so;
Varian ra o langach, chanch a reont a vro,
Ha disanaout o ferc'hen memes, gant an amiser;
Mæs biscoas n'o deus gallet disanaont eur C'hrouer.

Abred e voe negliget meur a vertuz moral;
Mont a ræs deus o memoar meur a virione all;
Mæs en queit a ma chommas tam squiant en o fenn;
Biscoas an Divinite na voe ancouet a grenn.

Evit guir, ar baïanet ne vouient quet a sur
N'ez eus nemert un Doue, hac eo eur speret pur;
Sot avoalc'h e voent memes, quent tremen hep hini,
D'er multiplan, sivoas! ha d'en difiguri.

Ne vijent jamæs couezet en eur sort tromplêson,
Ma vijent bet attantif da langach ar rêson;
Homan, pa goms a Zoue, a lavar c'hoas ouspen
N'ez eus effectivamant nemert unan hepquen.

Nan, n'ez eus nemert unan, na ne ouffe beza;
Ar re a ve en tuont, na vent mad da netra;
Rac Doue, dre he natur, pa'z eo oll-buissant,
Quement a rayo unan evel a rae cant.

Daou Doue indepandant a rayo labour fall,
Rac unan a hell dispen ar pezh a rañ un all;
Ha ma ne hellont ober mann hep en em selaou,
Int, en o farticulier, impuissant o daou.

An nep a lavar Doue a lavar dre eno
An hini so infinit en perfectiono;
Or, he guentan privilach eo bezan hep e bar:
N'ez eus'ta nemert unan en env hac en douar.

Eur vez eo d'ac'h, va brois, exijan digane
Prouvi d'ac'h eus un Doue, rac ar bed oll, nos-de,
A bubli e c'hrandeuriou: an traou insansiplan,
Scleroc'h evit ne rin-me, a goms d'ac'h anezan.

Digoret levr an natur ha taulet ho sellou
Var an oll grouadurien: o pebes burzudou!
Evit o executi pebes oll-buissanç!
En o c'honservation savantan Providanç!

Mar supposer eur veach n'en deus Doue ebet,
Ar vuez so un hunvre, ha dall eo hon speret;
Ar bed oll so un desert an epouvantapla,
An natur so eclipsset, n'en domp sur a netra.

Mæs anzavet un Doue, ractal e velan scler;
Nemert Doue e-unan ne gavan eur myster,

Hac ar myster-se memes a zigor d'am ine
Ha dor an oll secrejou ha dor ar virione.

Sul-diæssoc'h eo he gompren, sul-vui en adoran;
Evel an heaul radius, den ne hell en fixan,
Mæs var he oll ouvrachou e remerqan tracet
Squeud he berfectionou, he verq hac he gachet.

An den an ignorantan, mar dezir en anaout,
Ne renqo quet studian: avoalc'h eo dezan caout
An usach deus he rêson, daoulagad en he benn:
Al levr a goms a Zoue a hell an oll he len.

Deus eta, den incredul, deus da scol an natur;
Pignomp var beq eur mene, lennomp gant plijadur
Al levr bras deus ar bed-man, lennomp-an en pep corn;
Ma ne veles un Doue, e remerqui he zorn.

Sell goarec ar firmamant, sejour ar sclerijen,
Sell un arme a stered a vrill a-us d'az penn;
Ar silanç harmonius deus o march regulier,
O distanç deus an douar, o eclat, o niver!

Sell ar blênen spacijs ha leun a vajeste
Deus an elemant liquid; bep daouzec heur eo tre,
Ha pep daouzec heur gourleun. Ar c'hrouadur bras-man
Diou veeh bemde, a sonchfes, a deu da respiran.

Sell ar c'houris transparant a ra endro d'ar môr
An horizon alaouret a serr hac a zigor
Bep eil guech dor ar mintin hac hini ar gousper
Bemde requis, na jamæs da eur memes amser.

Piou en deus antreprenet d'ober eur reglamant,
Quen variapl en eur sans, en un all quen constant ?
Nac a belec'h eo tennet ar matier precius
Da ober traou quen charmant, quen caer, quen curius ?

Sell ous an heaul o pignal er vols celestiel,
An deiz o commanç tarzan, ar vrumen o sevel,
An douar o voguedi, pa sant he domderen,
Hac an natur o c'hoarzin, pa vel he sclerijen.

Sell he lagad o virvi, he dal o flaminan,
Nac a c'hloar, nac a splendeur a so endro dezan !
Paret evel eur roue, e seblant eo arru
Var an oll grouadurien da ober he revu.

Sav, den mortel, emezan, ha deus da labourat ;
Profit deus ma sclerijen da ober œuvrou mad :
Rac piou a hell assuri ne vezo quet heman,
Martese ; deus he vuez an devez divezan ?

Me am eus anavezet ta zud ha re ta re ;
N'en dout quet a hnelloc'h condition evite :
Ar re-se a laboure. Perac n'en raes quet ?
M'em eus tro'r bed da ober, ha n'en em gleman quet.

Me ro ar fleur d'ar prajou hac o deillou d'ar goe,
Me ra d'an ed quellidan, d'ar frouez bezan dare ;
Ma sellou a rent fertil ha joaüs an natur :
El lec'h ma veli ezom, rent ive plijadur.

Bep mintin e tigorán, evel eur marc'hadour,
Ar stal vras deus ar bed-man dre ma fales a aour ;

Ehoas, quemer, me-ro gratis ; mæs sonch trugarecât
An hini so dreist-oun-me, ta Autrou ha ta Dad.

Al loar, bep abardaevez, gant he bisach arc'hant,
Quen caer hac eur berlezen en touez mil diamant,
A ra cessi-ar vacarm a labouriou an de,
Evit rei plac d'ar repos ha d'an dranquillite.

Discuis, emei, ma mignon, ha quemer ta repos,
Endro ta dy me veillo breman en pad an nos ;
Ha mâr renques, dre valeur, interrompi ta hun,
Ha mont en hent adarre, me vo ta gompagnun.

An heaul a renq e-unan brillan en pad an de ;
Troubli rai ta zaoulagat, mar selles outan re ;
Mæs me so graciussoc'h : mar gra d'id plijadur,
Ec'h elles, hep accidant, contempli ma figur.

Ma sclerijen so commod. N'em eus avi ebet
Evit guelelet o luya endro d'in ar stered ;
Beteç ar prenv-goulaouyer a lesan da squeudi ;
Divoal, evel a ran-me, da goncev jalousi.

An astrou all so squignet dre bevar c'horn an êe
Evel goulou alumet, pa ve tec'het an de,
Da zisquel d'ar merdead he roujou er môr don,
Ma hello mont, hep danger, d'he zestination.

Ravisset en em gavan, o velet mouamant
Hac equiliber an astrou ebars er firmamant.
Abaoue ma'z int crouet, hep cessi eur moment,
Peb-hini a ra he dro, ha dre eur memes hent.

Ma teuffent d'en em stoqan ha d'en em arret,
 Mar vanqfe eur vech memes an deiz da c'houlaoui,
 Pebes trubuil en natur ! pebes confusion !
 Ar bed oll en em gavfe sezisset a spouron.

Mæs ma speret so brouillet ha digoncertet crenn ;
 Chom a ran qasi batet, pa zeuan da gompren
 Ar vent, ar brasder enorm deus an heaul hac al loar,
 Nac en petore distañ emaint deus an douar.

Ar vianan stereden (poan so ous he guele)
 A gonter, so trivec'h guech brassoc'h evit ar bed ;
 Sonjet, a broportion, peguen bras eo'r re all,
 Hac, en touez an oll astrou, an heaul ispicial,

Un tenn canon a raje tri-uguent leo peb heur,
 Hac a guersfe ordinal gant ar memes ardeur,
 A ve c'hoas d'an neubeutan pemzec vloas o querset
 Quent tiout ar stereden a so nissan d'ar bed.

Estonet oud, ma mignon ; mæs, ma lavarfen d'id
 Dreist ar stered a veles eus un nombr infinit
 A re all, bras pe vrassoc'h, hac an eil var eben,
 Quen huc, queit dioussimp, ne hell den en compren.

O pebes immansite ! O pebes hucldet !
 Peguen franq, peguen ledan eo region ar stered !
 Oh ! pebes conception, ha peguen bras galloud
 A dle da gaout an hini a ræs an traou-se tout !

Eur miracl continuel eo guele ar bed-man
 O chom en e bez picol hep crevi na fraillan,

Hac en formet gouscoude a bevar elemant
 A ra an eil d'eguile bresel incessamant.

Ruillan a ra an astrou, hep couezan dious an ée ;
 Ar môr, gant he reversi, a chom en he vele,
 An douar ferm ja resist d'an avel o c'hoezan,
 Hac an tan cuzet dre oll a chom hep flaminan.

Mar couefe eur stereden, ar bed oll ve fraillet ;
 An tan, mar teufe d'achap, an oll ve ambraset ;
 Lonqet ar vro, ma teufe ar môr d'en em diroll,
 Hac an aer, ma ve tevoc'h, cetu mouguet an oll.

Red eo un dorn invisibl bep momet o terc'hel
 Peb-hini deus ar re-man en he blaç naturel,
 Hac un dorn oll-galloudus, rac hini'nê ne ra
 Nac effort, na resistanç da essa stourm outa.

Mæs mar so er firmamant traou extraordinal,
 Me rayo d'id iselloc'h guele marvaillou all :
 Arret eta ta sellou var ar grouadurien
 A chom guenid assambles en eur memes traonien.

Sell nac a variete a vent hac a structur,
 A gri, a ies, a langach, a liou hac a figur
 An douar so goloet hep cont hac hep niver,
 Darn dindan, darn varc'houre, darn en dour, darn en aer.

Impossubl eo niveri ped espec differant
 A nich, a neu, a vale, a remu hac a sant ;
 Hep contan millionou, pere so destinet
 Da brodui, da zivoan, heb bezan animet.

Piou a ouffe expliqan penaus na pe feçon
E ve formet ar c'horfou dre generation,
Na penaus, ispicial, ec'h arru ar myster
Ma ve pe mal pe femel ar frouez a goncever?

Eur squiant digoncevapl eo a renq presida
D'an traou-se, rac an natur ne voar quet petra ra;
Pe mar e deus eur speret da rei dei sclerijen,
Ar speret-se eo memes an Doue a glasquen.

Peb crouadur so formet gant an dimansion
A dere deus he natur ha deus he fonction,
Propr d'en em vultiplian, capabl d'en em divoal,
Evit ornament ar bed hac an urz general.

Bezan so var an douar nombr a grouadurien,
A so mil guech bianoc'h evit eur fabuen,
O deus mellou, goaziet, penn ha treid peb-unan,
Aliessoc'h a ezel evit an olifan.

En ouez ar memes espec hac ar memes natur,
Ne gaffac'h quet gouscoude hanval daou grouadur :
An eil so deus eguile anavezet bepret;
Mæs oll, feçon pe feçon, int differanciet.

N'ez eus hini anezê a ve crouet en yaen :
Peb-hini, en he feçon, a so util d'an den;
Darn evit en exerci, darn evit he vezur,
Darn all evit he sicour, darn all d'he blijadur.

Ar marc'h ne drain an arar, ar vioc'h ne ro aman;
Al lapouezet ne choront, he ra mel ar guenan,

N'ez eus glan var an denvet, na trevat er parcou
Nemert evit furnissan d'an den he ezomou.

Peb amser ha peb sêson, an eil varlerc'h eben,
A erru, hep varian, da recrei an den;
Hac evel da un Doue, peb-hini en deus c'hoant
Da rei dezan un tribut ha da offr he bresant.

Ar fleur, en nevez-amser, a guinic o ezanç,
An hân, prodig a vadou, a offr en abondanç
Victimou var he auter, quen e deu alafin
An eaust da rei ar bara, hac an here ar guin.

An tan a brodu dezan sclerijen ha tomder,
An avel en rafrechis, an dour en disalter,
An ær a form he aelan, ha d'he vagadurez
Ar môr a ro he besquet, hac an douar he frouez.

Pebes generosite er grouadurien all !
An den, sivoas ! e-unan a so cri ha gadal;
Ne avis quet, an ingrat ! examinan memes
A belec'h e teu dezan eur sort pinvidiguez.

Labour am he discoursi var quement so crouet;
Ha pourmen deus an eil penn da eguile ar bed,
Evit rei d'ac'h da entent ar vertuz, an natur,
Ha quement utilite en deus peb crouadur.

Mæs piou eo an inginer hac ar speret subtil,
An dorn experimantet, hac ar sculpter habil
En deus crouet an traou-se ? Rac, hep un artisan
Impossibl eo d'e bezan en em c'hret a unan.

Eur c'hastel caer batisset gant reglennou an art ;
Den fur ne gredfe avanç e ve gret dre hasard ,
E ve ar mein beneres , ar c'hoat hac an doen
Diazezet , esquennet ha taillet hep dorn den.

Ajustet eo ar c'hamprou d'ar vînc a gondou d'ê ,
Ar prenestrou so placet gant regularite ;
Ar gueguin a so bolzet , lambrusquet eo'r salon :
N'en deo quet gret an traou-se hep calvez na masson.

Red eo bezan insanset evit imaginan
N'en deus den nac imprimet na scrivet ar Vers-man ;
Mæs eo anê o-unan int couezet var baper
Al liou , al liserennou , ar rim hac ar matier.

Quemeret eur boesellad liserennou moulet ,
Ha squillet var plât eur gampr anezê a dol-jet ;
Caer ho pe c'hoari'n dinçou er feçon-se gante ,
Biquen tri guir rêsonabl ne formfet evelse.

Red eo gant combinêson placi peb liseren ,
Da represanti guiriou ha goude eur phrasen ,
Eur bagen hac eur chabistr , hac eur levr alafin ;
Mæs ne rer quet quementse hep studi nac ingin.

Ar vech quantan ma velet eur montr o labourat ,
A verq gant precision an heur , an de , an dat ,
Dre introdu an noade a varch var ar c'hadran ,
E sonch d'ac'h e deus buez hac e ia e-unan.

Mæs pa'z et d'he digueri , pa velet ar ressort ,
Ar chaden , ar balancier , ar mouamant accord ,

Entre rodjou quer mibin , ractal ec'h anzavet :
Heman so eur pezh achu gret gant un den adret.

Ma ne hell eta un ty , eul levr , eur bandulen ,
Bezan gret hep artisan , piou a ouffe compren
E ve formet ar bed-man ha quement a veler
Hep artisan , na model , na danvez d'o ober ?

Mæs , o supposi memes an danvez var ar plaç ,
Ha prest ar materiou ; red eo devinan c'hoas
Piou en deus o animet , hac o laquet en train ,
Darn da vont varzu ar fond , darn da sevel d'al lein.

Ar matier , dre he natur , a so poner ha lach ;
Ma ne ve quet remuet , biquen ne deu da flach.
Piou en deus roet dezan ar mouamant quantan ,
Ar form , an direction , ar stum en deus breman ?

Ar mouamant naturel , pa gommancer finval ,
Eo quemer an eun-lignen , mont var eun ordinal.
Piou en deus gret d'an astrou dilesel ar rout-se ,
Ha trei endro d'ar bed-man , pe ar bed endro d'ê ?

En meur a sans differant o guelan oll o trei ,
Piou en deus determinet he varch da bep-hini ?
Piou a ra d'ar bed bale gant quement a gadanç ,
Nemerdoc'h , ô ma Doue ! dre hoc'h oll buissanç ?

O incredul dibourvez a feiz hac a squient ?
Ha te a hello breman dont abenn da entent
Eo eur speret infinit , un intellijanç pur
En deus crouet ar bed-man hac a ren an natur ?

D'en em groui e-unan n'ez eus capabl netra,
 Rac evit en em groui eo red bezan dija;
 Ar pezh a vez supposi ez oar ha n'ez oar quet,
 Ez oar crouet d'an ampoent n'ez oar get c'hoas crouet.

Mæs en resonniou quer simpl, pa ne ententes mann,
 Goulen eta eur veach diganid ta-unan,
 Piou en deus ta digasset, ta laquet er bed-man;
 Rac deus ta benn ta-unan n'en dout quet deut aman.

Entrezomp, crouadurien, n'en domp quet a viscoas;
 Hirie omp, dec'h ne oamp quet, ha ne vimp quet varc'hoas;
 N'ez eus netra er bed-man a ve quen necesser,
 Nac a guen bras importanç, ne heller en divoer.

Breman ez eus daou c'hant vloas ne voas quet en buez;
 Quantoc'h ec'h allies guenet, divezatoc'h ive,
 En Indes, pe er Japon, evel en Breiz-Izel,
 Dindan lezen Mahomet pe scol an Aviel.

Var nicun eus an traou-se n'en dout bet consultet:
 Gant piou eta e sonch d'id ec'h oud bet deputer
 Da zont da recev buez? rac imagin ervad
 Ne voe roet d'id honnes na gant mam na gant tad.

Nemert ta gorf hepmuiquen n'az poe deus ta berç'hen,
 Ha ta berç'hen o-unan n'o devoe ive quen
 Digant o zud dirazê, a-dal an tad quenta,
 A voe, er c'hommançamant, crouet deus a netra.

Ia, Doue eo e-unan a zispans ar vue,
 Hac a unis assambles ar c'horf hac an iné;

O zennan, pa blich gantan, a ra deus an neant,
 Hac eno retorn ar c'horf adarre, pa gommand.

Mæs ar C'hrouer, emedoud, a belec'h eo-an deut?
 —Arret ase, ignorant. Consider un neubeut;
 Deus an oll guirioneou homan eo ar sourcen:
 Crouer an oll ne ouffe bezan crouet gant den.

Evit compren quement-man dre eur barabolen,
 Deus an êe bete'n douar supposomp eur chaden
 En em souten mail ha mail bete'r mail huellan;
 Mæs lavar d'in: ar mail-se, piou a zalc'h anezan?

Mar leveres eo dalc'het en tu bennac ous crec'h,
 Bep tol me a c'houlennno gant piou nac a belec'h?
 Hac herve a responti, me c'houlennno ouspen,
 Piou a zalc'h ar firmamant memes aziouc'h ta benn?

Forcet e vi da anzav eus eur mail principal,
 En em souten e-unan, hac a zalc'h ar re all
 Dre he vertuz hac he ners, hep sicour digant den;
 Ne verites nep repliq, mar dirêsones quen.

Ar chaden eo an natur, hac ar maillou pep raç;
 A bign ligne ha ligne bete nep o c'hrouas;
 An organel huellan eo ar C'hrouer, erfin,
 A so hep commançamant, evel ma vo hep fin.

E-unan indepandant, an oll so dindana;
 Nemert dre he assistanç, allas! n'en dint netra:
 Gant eur guir, deus an neant e tennas ar bed oll;
 Mar car, gant eur c'hoesaden ec'h ell en cass da goll.

Al labour a remerques, non pas an artisan;
Ar bed-man a so matier. Ar C'hrouer e-unan
A so vertuz ha buez, speret pur ha parfet:
N'en deo na corf, na massif, evit bezan guelet.

Mæs, ma n'ec'h eus quen rêson da vezan incredul,
Nemert default a velet, oud un den ridicul:
Rac nac a draou er bed-man, pere ne veles quet,
Traou naturel couscoude, traou reel en effet!

Doüe dre oll so presant; mæs na occup na plaç,
Na nep bro particulier: ar bed n'en deo na bras,
Na ledan avoalc'h memes evit en ranfermi,
Ne ouffe quet ta lagad eta en comtempli.

Ar rêson a so suroc'h evit lagad an den:
Hoguen ar rêson ousid a gri var boes he fenn:
Un Doue so, ador-an. Pa veles he labour,
Cess da vezan incredul, rent gloar d'an oberour.

An eil de da eguile, an eil nos da eben
A annonç he buissanç. An oll grouadurien,
Peb-hini en he langach, a ra he yeulodi;
Pebes mez! n'en dianzav nemert an den impi!

Eternel dre he natur, ec'h exist a viscoas,
E pado da virviquen, hac eman en he choas
Ober evel a garo. An oll, bras ha bian,
A so conservet gantan: n'ez eus netra heptan.

Omnia per ipsum facta sunt; et sine ipso factum est nihil, quod factum est. Joan. Cap. 1.
Benedicam Dominum qui tribuit mihi intellectum. Ps. 15.

EILVET GUIRIONE.

IMMORTALITE AN INE.

Nolite fieri sicut equus et mulus, quibus non est intellectus. Ps. 31.

Me hoc'h ador, ma Doue, hac ho trugareca.
Ha possubl eo ho pe-hu gret quellies a dra,
Na quement a zispignou evit antretien
Un dra a so da velet quen dister hac an den!

Mæs petra lavaran-me? an den eo er bed-man
Ho parfetan crouadur. Roet hoc'h eus dezan
Un ine intellijant, capabl d'hoc'h anaout,
Hac eur galon d'ho caret, ar pezh so guellan tout.

An ine-se, evel doc'h, a grou mil sonjeson,
A gompren ar virionez, a agis dre rêson.
He memoar, he bolontez hac he ententamant
Eo ho portret veritabl hac hoc'h imach patant.

Gout a ra examinan, doueti, deliberi,
Choas, en em determinan; gout a ra preferi

Un action vertuzus da un all a so fall :
Ne veler netra hanval er grouadurien all.

Ped micher avantajus , na ped secret util ,
Ped calcul , ped instrument , ped benefeq , ped oustil
E deus forget an ine , evit ar blijadur
Da imitan , da drec'hi memes var an natur !

Poezet e deus an avel ha musuret an êe ,
Arpantet an Ocean , domptet ar loenet goe ,
Disquet teuzi ar metal ha chanch natur ar plant ,
Ha troet en he frofit ar pevar elemant.

Pa deu dei c'hoant musical , hep implijan ar mouez ,
Var ar c'hoevr hac an orjal e fredon en he æz ;
Dre scrit , hep offiç an teod , e convers en peb bro ,
Ha breman ar re varo a goms gant ar re veo.

Disquet e deus d'al lagad guelet dre ar c'hristal
Astrou en tu all d'an heaul , ha meur a vurzud all
Invisibl bete vreman. Anfin , gant ar c'hompas
Eus cavet eur bed neve ne hanaviet quet c'hoas.

Nac a bed invantion o deus crouet an dud ,
En queit ha ne remerquer en anevalet mud
Na gout , na capacite da ober voel na voas :
Ar pezh a reont breman , en rejont a viscoas.

Gaou hoc'h eus eta credi en deus darn al loenet
Rêson hac ententamant , balamour m'o guelet
O soignal o re vunud , o clasq magadurez ,
Pe oc'h ober o neizou gant quement a adres.

Ar rêson a ziscoenont n'en deo quet o hini ;
Mæs rêson ar Mestr habil a deu d'o c'hondui :
Evel eur montr a ziscoen squiant an artisan
En deus-an gret , ha non pas he squiant e-unan.

Couls e ve d'ac'h pretanti o deus squiant ar goe
A les o greun da gouezan doustadic dindannê ,
O golo gant o deillou , da germi er gouan ,
Hac a fleuris adarre d'o abrian en han.

Differant bras eo ober , ha gout perac e rer ,
Rac an oll elemanchou , an natur en antier
A ra , mæs hep gout perac , parfetamant peb tra ;
An den hepquen e-unan a voar perac er gra.

Ar goms a so suffisant da instrui an den ;
An taul a so necesser evit dressi al loeu.
Da c'honid an diou natur eus ive diou feçon :
Al loenet dre vac'hadou , hac an den dre rêson.

Lesomp'ta al loenet mud evel ma'z int crouet ,
Pe hi o deus un instinq , pe int-hi n'o deus quet :
N'oun doare. Mæs conduet gant dorn ar Brovidanç ,
Ec'h ellont ober traou fur , hep caout intelliganç.

An den memes e-unan a ra mil action
Hep consulti he ine hac hep reflexion :
Crafat he benn , remui , hac en em dic'hourda ,
Crachat , frottan he zaouarn , hep gout petra a ra.

Evelse'teu al loenet da imitan an den ;
Mæs dre guement a reont , e remerquer hepquen
Int corfou gret dre ressort , instrumanchou agil ,
A ro d'imp anaoudeguez da betra int util.

Corf an den a so ive evel hini al loen ;
 Un instrument d'an ine , evit , dre he voyen ,
 Remui ha dirijan ar grouadurien all
 Var bere eo deputed cabiten general.

O caeran privilachou e deus ine an den !
 Ar rêson evit partach , an droat hac an domen
 Var quement a so crouet , hac en tu-all da se ,
 Ar faveur preciussan : an immortalite !

An articl-man a brouver dre ar metaphysiq ,
 Gant rêsonniou ne heller ober d'ê nep repliq ;
 Difficil int da entent d'an nep so hep studi ;
 Mæs me o laqai aman ar scleran ma hellin.

Ar membr an admiraplan , an utilan ezel
 Deus an den , eo al lagad. Hennes eo'r santinel
 A vel deus he c'heriden , hep en em diaezan ,
 Quement tra , quement objet a so endro dezan.

An traou ne hell quet an dorn da douch na da dapout ,
 Mab al lagad o digass en eur moment d'he gaout
 Hac evel en he guichen dezan da gontempli
 Petra a hell da dennan a vad deus peb-hini.

Al lagad , evit bezan quen parfet he labour ,
 D'en em velet e-unan a renq eur mellezour ;
 Er memes tra , an ine ne vel nemert dre boan
 Anez mellezour ar feiz he guenet e-unan.

Couscoude , evit prouvi he immortalite ,
 N'em eus sonch da implijan nemert autorite

Ar sclerijen naturel , ma vo guelet patant
 Eo ar feiz hac ar rêson accord parfetamant.

Me voar ervad , ma Doue , just eo en avoui ,
 Eus un distanc infinit entre'n ine ha c'houi :
 C'houi ra peb tra gant eur guir en heur ma lavaret :
 « Da vo gret ar sclerijen » , ar sclerijen so gret.

Mæs an ine , evel doc'h , a hell en un instant
 Ha concev ha produi en he ententamant
 Mil dra extraordinar. Mar chommont da ober ,
 Eo n'en deus quet a bouvoar avoalc'h voar ar matier.

Allas ! ha treid ha daouarn , oustillou ha danve ,
 Assambles pe peb eil guech a so ous he dale ;
 Ha nemert dre hir-amser na hell executi
 Mil projet a imagin , mil sonch a deu dezi.

Pes labour un artisan a ve gret en he benn ,
 Ha forget en he speret arauc en antrepren.
 Ma ve he zorn a iae quer prompt hac he ine ,
 Ne hell den imaginan nac a draou a rae.

Sonjal ha bepret sonjal eo natur an ine ;
 Sonjal a ra en difun ha sonjal dre hunvre ;
 Or , ar sonch a dle bezan un dra spirituel ,
 Rac nê gouez dindan hini'r squientchou naturel.

Imaginet eur bouldren , un dra an disteran ,
 Caout a refet couscoude daou dimansion dezan ;
 Un dindan , eur vare'heure , eur c'hreis entre'n daou benn ;
 Mæs biquen se ne gverfet en sonjeson an den.

N'ez eus na squer, na compas capabl d'he muzuri ;
N'en deo na bras na bian ; n'e deus na deou na clei,
Na costez, na paramant, na liou, na vent ebet,
Na nep henvelidiguez gant quement so er bed.

An den n'en deo couscoude quen assur deus netra
Evel deus he sonjeson, rac e remerqui ra
Evel eur verelaouen a vrill en he ine,
Hep james disparessi nac en nos, nac en de.

Attribui d'ar cervel, d'ar goad, na d'an empen
Ar faculte da sonjal, ar vertuz da gompren,
A so injust ; rac erfin, perac e privet-hu
An troad, an dorn, an elin deus ar memes vertu ?

Mar lavaret eo commun ar vertuz-se d'ar c'horf,
Ar c'hoat, ar vein, an houarn, eur pod, eur vaz, eur forc'h,
A vo capabl da sonjal, rac corfou int ive,
Ha, pa sonjont, a rêson couls ha c'houi, martese.

Mæs nan : ne hell quet divoan deus ar gorrupcion
Eur guenet quen precius evel ar sonjeson.
Ar matier uemert matier ne hell da brodui,
Hac ar sonch ne goncever matier ebet enni.

Guir eo, an den a veler egaret he rêson,
Pa arru, sivoas dezan ! nep alteration
Er fibrou deus he cervel ; rac an ine a cess
He operationou neuse en diaves.

Ar c'horf a so viciet, ha non pas an ine.
An horoloch a labour hep ma verq an noade.

An ine a gontinu da gaout sonchou bepret ;
Mæs allas ! rentan rêson aneze ne hell quet.

An habilan organist, mar dirench he ogro,
E vo faus ha disacord an ton a c'hoario ;
Pa ve distign ar c'herden, ar violonç so mud :
En eur guir, hep benfiou ne labour quet an dud.

Mæs pa'z oc'h quen obstinet da rei d'imp da gredi
Eo ar c'horf hep an ine capabl da rêsonni,
Gret eta d'imp eur machin a vo deus ho feçon,
Ha communiquet dezan talant ar sonjeson.

Choaset evit en ober an ingredianchou ;
Deus ar matier subtilan, gret dezan ressortchou ;
Organiset anezan er feçon ma querfet :
Petra zisqfet-hu dezan, p'ho po-an achuet ?

Gout a rayo, martese, ober reverançou,
Mont ha dont, canan, dansal, prononci guiriennou,
Evel ar pompinellou deus ar marionnet ;
Mæs ober dezan sonjal, m'en tou, ne refet quet.

Pa vo capabl da entent ar mathematiquou,
An dessin, pe al logiq gant o oll reglennou,
Gret d'in gulet eur machin quen extraordinaryl,
Me accorde d'ar matier ar vertuz da sonjal.

Ar son hac ar sclerijen eo an traou ar scanva,
An neubetan corporel ; mæs ne sonjont netra,
Ha comparet d'an ine int traou grossier meurbet,
An ær livret gant an heaul, pe an ær agitet.

Art an electricite , vertuz ar men emant ,
 Liou ar ros , c'houes ar parfum , éclat an diamant ,
 Charmou an heaul o sevel , pourpr ar ganeveden ,
 A so crass ha vileni en tal eur sonch hepquen .

An traou caeran er bed-man n'o deus talvoudeguez ,
 Na pris , na realite cals aneze memes ,
 Nemert a broportion ma'z int consideret
 Gant fantasi an ine ha sonjou ar speret .

Pa'z eo quen pur , quen parfet , quen simpl ar sonjeson ,
 An ine he origin , gant muioc'h a rêson ,
 A so caeroc'h he guenet , ha se abalamour
 An artisan so noploc'h c'hoas evit he labour .

An ine a so ive simpl , immateriel ;
 N'e deus na poez na lec'het , na figur , nac ezel ;
 Immortel dre gonsequant ; rac , nemert ar c'horfo
 Ne hellont bezañ sujet da lesen ar maro .

Ar maro , var a ouzoc'h , eo an destruction
 Deus ar substanc corporel , ar separation
 Deus ar memrou entrezê ; ac'hane concluet
 N'hell quet an ine mervel , pa n'e deus mempr ebet .

D'ar c'horf ec'h eller troc'han hac un ezel ha daou ,
 Hep ma ve gret d'an ine na prejudic na gaou ;
 Ar c'horf a ziminuer ha non pas an ine ;
 Homan a chom ordinal en he integrite .

Mar boa an den-se savant , habil ha disquet mad
 Quent ma voe troc'het dezan eur vrec'h pe eur vorzad ,

E chom gantan , couscoude , he ingin , he squient ,
 Hac an oll habilete en devoa diagent .

Guelet a rer tud infirm ha tud estropiet
 O caout muioc'h a vemoar , delicatoc'h speret ,
 Eur jujamant solitoc'h , eur rêson muioc'h just
 Evit darn so divac'haign , corpulant ha robust .

Pa ve ar c'horf o repos , eo scanvan an ine ;
 Var diou esquel he sonjou e pign neuse en êe ,
 Pe e tisquen eu ifern ; hac hep en em fixan ,
 Promptoc'h evit an avel , e ra tro ar bed-man .

Erfin , pa deu , dre gozni , an den da gaducat ,
 Eman amser he furnez hac he avijou mad ;
 He vemrou a so gourdet , n'en deus pelloc'h a nerz ;
 Mæs he rêson so assur , hac he ine so serz .

Goude rêsonniou quen scler , an nep a lavarfe
 Eo deus ar memes substanc ar c'horf hac an ine ,
 A so un den vicius hac etourdi he benn ,
 Evit gallout , diremors , bevan evel al loen .

Ar baianet o-unan a immortalisas
 En o guis an ineou , hac a imaginas
 E renquent deus an eil corf tremen en eguile ,
 Da vezan purifiet quent mont d'an Elisee .

Instruet gant ar rêson , an oll dud ancien ,
 O deus credet ec'h aje , goude maro an den ,
 En eur vro all he ine , evit receo enno
 Chatimant pe recompanç , herve he merito .

Er fond , an dud vertuzus a veler alies
O souffr , a hed o amser , miser ha dienes ;
Hac ar re detestaplan o caout prosperite ,
Chanç , boneur hac enoriou entro pad o bué.

Ne heller concilian daou dizurs quen contrel
Gant madelez un Doue hac he justiç santel ,
Nemert ni a supposse ez eus eur vuez all
Evurus d'an dud honest , maleurus d'an dud fall.

Dre un dezir naturel peb hini a requet
Ma vo gret he veulodi c'hoas goude he zeced ;
Rac rei a ra da gredi dezan he santimant ,
Evit bezan decedet , n'en deo nemert absant.

Na Doue , nac an natur ne ra netra en væn ;
Pa o deus eta gravet an dezir-se en den ,
Eo evit rei da entent an ine ne dle quet
Perissan gant ar c'horfou , mæs subsistan bepret.

O excellanç an ine ! n'en dout quet esclaves ,
Na sujet d'ar viseriou ar c'horf a animes ;
Pa deu heman da vervel , e chances a vue :
Pa ve an ty discaret , ar mestr a ia pare.

Cetu eta , ma broïs , dre ar rêsonnamant ,
Rancontret diou virionez ha daou dra important ;
Da guentan , eus un Doue , Crouer universel ;
D'an eil , natur an ine eo bezan immortel.

*Signatum est super nos lumen vultûs tui , Domine ; dedisti
tætiliam in corde meo. Psalm. 4.*

TAERVET GUIRIONE.

NECESSITE AR REVELATION.

*..... Eripuit nos Deus de potestate tenebrarum et transtulit
in regnum filii dilectionis suæ. Coloss. 1.*

Ne scuisomp quet , ma broïs , ous en em instrui ,
Rac nemert an iguoranç ne ra d'an dud impi
Casout evel a reont lesen an Aviel ,
Pehini eo couscoude al lesen naturel.

Mad-oberou ar C'hrouer ha dever ar rêson
A brouv an necessite deus ar Religion ;
Rac netra rêsonnaploc'h evit trugarecat
Ha rentan gloar hac enor d'ar sourcen a bep mad.

Pa'z eo an den composet a gorf hac a ine ,
Eo just e gontribufe an eil hac eguile
Da rentan , en o feçon , d'ar Mestr oll-buissant ,
Homachou interieur hac eur c'hult apparant.

Mæs ar rêson e-unan ne lavar quet d'an den
Petore cult a dleer d'an Autrou souveren

Na pesson sacrificeou a so red d'he galmi,
Pa hon po bet ar maleur, sivoas! d'en offanci.

Ouspen se, ar goall exempl, dallente ar speret,
An inclinationou, ar galon corrompet,
Alies trec'h d'ar rêson, a hell chanch an homach
Deus an adoration en pur hugunodach.

En queit a ma voe leset an den gant he rêson,
Hep sicour nac assistanç ar revelation,
E voe guelet gant horreur, ouspen en eur c'hontre,
An drouq-speret adoret en plaç ar guir Doue.

An drouq-speret, dre orgouil, a felvezas dezan
Bezan ingal da Zoue ha parfet eveltan;
An den, dre gorrupcion, a forjas, er c'hontrel,
Doueou hanval outan, vicius ha charnel.

Da oll viçou he galon ha da re he ine,
E choasas peb a batron, e ræs peb a zoue;
Hac evit caout un excus en he oll dizursou,
E quemeras da vodel exempl he zoueou.

Evelse gant an amser e voe placet en êe
Ar c'hrim hac he c'homplicou, ha dre un dallente
A zizenor ar rêson, e veljac'h adori
Doueou ne garjac'h quet da lojan en ho ty.

Jupiter an impudiq, Mercur, tad al laeron,
Venus, ar vreg debordet, an infam Cupidon,
Bacchus, patron an debauch, Mars, diaoul ar muntrou,
Hac an oll sceleradet a voe gret doueou.

Dindan mil figur estranch e voe representet
Idolou mal ha femel, darn tud, darn serpentet;
Hac ar païan, d'an daoulin, evel un imbicil,
El lec'h un Doue hepquen a anavezaz mil.

Pep Doue da imitan a re d'an hugunot
Bezan sul-viciussoc'h, sul-vui ma voa devot;
Ha dre ma re he bossupl evit gonid an êe,
En creis gouelet an ifern en em brecipite.

Ac'hane e commanças ar superstition
Da invanti mil espeç abomination:
Sorcères, divineres, ceremoniou væn,
Observançou impudiq, sacrificeou humæn.

Ni hon-unan, ma brois, quen ma voe annoncet
En hon touez an Aviel, a voa ive plonjet
Er vrassan tevalijen deus an idolatri:
Ne voa quet voar an douar sottoc'h evidomp-ni.

Quement enezen nevez ha quement continant,
Dre ma voent disoloet, betec an heur bresant,
A voe cavet habitet gant tud goe ha sauvach,
Ha nemert da idolou ne rentent o homach.

Darn o devoa eur serpent evit en adori,
Hac a gasse bugale dezan da zevori;
Darn all voa ar c'his gante, hac a gave abeg
Pa ve maro an ozac'h, ma ne lazet ar vreg.

En eur vro, eur merdead, pa deuje d'en em goll,
E voe casset he galon beo-buec d'an idol;

El lec'h all ec'h ordrenet d'an dud yaouanq morgan
O zad, o mam, pa chomment re bell da languissan.

Gant mez ha confusion ne gredfen quet parlant
Deus al lubriciteou, an ardou indeçant,
Ar pratiquou infernal a voe imaginat,
Gant an dud evit rentan enor d'an drouq-speret.

Poan ho pe ous ma c'hredin ; mæs guir eo couscoude,
Quement action barbar, quement brutalite,
Quement crim, quement torfet ec'h eller da ober
A voe cavet vertuziou ha gret d'é un auter.

Estranchan impiete ! peguen dibalamour,
Peguen dall, peguen coupabl eo rêson an den paour !
C'hoant am be da lavaret eo couls tremen hep-di ;
Al loenet gant o instinq a so muioc'h dissi.

Mar gra an den he zever, eo en despet deza ;
Mæs traou a so difennet, ar re se a c'hoanta
Da ober dre breferanç, ha p'en deve-é gret,
He sorc'hen a goust dezan alies mil regret.

Carout ar mad ne ra quet, casout an drouq a ra,
Blam, hac eur momet goude meuli ar memes tra,
Na james bezan contant, cetu ase an den,
Gant ar rêson inconstant a so carguet d'he ren.

Dre oll e clasq he voneur, hep e gaout en nep lec'h,
Ous un dra en rejouis, eus cant all hac en nec'h.
Hirie voar rod ar fortun, varc'hoas eman dindan ;
Guenel a ra en daerou, mervel a ra er boan.

C'hoas mar vije ar boneur reservet d'ar vertu !
Mæs allas ! peur-liessan ar c'hontrel a arru.
Eur gombat continuel, eur micher meurbet rust
Eo pratiq ar vertuziou ha buez an den just.

Paourante, collou, clenvet a deu d'en eprouvi,
Ar bed hac he vaximou a so ous en senti ;
Hac ar pezh a ro dezan c'hoas muioc'h a labour,
Eo dompti he goall banchant, he vrassan adversour.

An den a so er bed-man eur roue didronet ;
Gret voa evit commandi d'he siou direglet ;
Mæs reyoltet eo outan ar sujedet fall-man,
Ha breman, el lec'h gouarn, a renq oboissan.

Ar rêson c'hoas avechou a bretant eo mestres,
Mæs deziriu ar galon a c'holo dei he mouez,
Hac a refus he selaou quen na vent contantet.
Ar gonscianç a reproch ; mæs an drouq a ve gret.

Ha possubl ve e vije au den quen variant,
Quen dientent, quen follec en he gommançamant !
Salocroas ! rac ar C'hrouer a ra peb tra parfet :
He oll œuvrou so dissi, hac an den n'en deo quet.

An den so digeneret eta eur c'houls bennac,
Ha ne voar quet e-unan na penaus, na perac.
Piou a revelo d'imp-ni a betore sourcen
Eo deut ar c'hentan dizurs deus an natur humen ?

Me vel an anevalet hac ar bed en antier,
Oc'h ober incessammant bolontez ar C'hrouer.

An den hepquen antetet en he revolterez,
Ne selaou den, na Doue, na conscianc memes,

Piou a reconcilio an den gant he Zoue?
Na piou a remedio da glenvet he ine?
Allas! dôn eo ar gouli, an drouq a deu a bell;
M'em eus aon bras he bec'het a so originel.

O puissanc eternal! disquennet deus an êe:
Laquet c'hoas ho crouadur voar hent ar virione;
Sicouret-an hoc'h-unan da bresanti erfin
Un homach pur ha parfet d'ho majeste divin.

Consideret gant truez frenesi he rêson,
Tevalijen he speret, gouliou he galon,
D'en tennan deus an neant, pa'z oc'h bet he Grouer,
D'en tennan deus ar pec'het, bezet c'hoas he Salver.

Ar beden-se, ma broïs, a so bet exaucet;
Deus he drôn celestiel, Map Doue disquennet,
En deus prenet an ine dre he varo er groas,
Hac iustruet ar rêson dre al lesen a c'hraç.

Al lesen-man, c'hoas eur vech, eo lesen an natur,
D'abord gravet en calon ar c'hentan crouadur;
Un eil guech gant Moyses e voa bet publiet,
Un daervet gant Jesus-Christ eo bet sanctionet.

Da dribunal ho rêson eo ho calvan brema,
Consultet-hi, mar queret, evit gout var petra
Eo fontet ar virione deus ar Religion,
Non pas evit penetri ar revelation.

Just eo d'ac'h examinan, rac na bretantan quet
Gonid hoc'h assantamant, quen em bo discoenet,
Ha gret d'ho rêson memes santout quement preuven
A dlê rei d'ac'h da gredi lesen ar gristenien.

An implich deus ar rêson hepmuiquen a gonsist
Da c'hout hac ên so Doue hon Salver Jesus-Christ;
Hac ên a ræs d'en prouvi quellies a vurzud,
Anfin, hac ên a lesas un doctrin gant an dud.

D'abord, n'ez eus nep douetanç né hell Doue parlant,
Langach an oll dud marvel pa'z eo oll-buissant;
Hac an dud deus o c'hoste n'o deus bet ar rêson,
Nemert evit ma halljent recev instruction.

Naturel eo d'an Autrou parlant ous he vevel;
Ar Roue ous he sujed, an Tad ous he vuguel;
N'en deo quet injurius quen neubeut d'ar C'hrouer
Parlant ous he grouadur, quelen he servijer.

Ne heller eta oppos d'ar revelation
Nac impossibilite, na contradiction.
N'em eus ive da brouvi nemert un dra hepquen:
Eo Doue deut en effet da rediman an den.

Dre c'henou he Brofetet, dre offic he Aëlez,
E re da anavezout guechall he volonteiz;
Mæs en amser divezan eo deut he Vap divin
Da breség d'imp e-unan santelez he doctrin.

Var an douar ne arru netra dre accidant,
Dre chanç, na dre avantur; just eo dre gonsequant.

Anaout eo ar Brovidanç en deus ho preservet
Bars en oll dangeriou-man : anes voac'h oll collet.

An den a voe gret expres da serviji Doue,
D'he anaout, d'he garet, hep forci couscoude
He liberte naturel ; ha mar bije fidel,
E voa destinet dezan eur boneur eternal.

Allas ! dre ali satan en em rentas pec'her,
Maleurus dre gonselant, opposet d'he Grouer ;
Mar vije bet imposubl graç he silvidiguez,
An diaoul en em gave trec'h da Zoue memes !

Mæs ar C'hrouer a voezo repara he labour,
Humilian an drouq-speret ha rei d'imp c'hoas sicour :
Infini eo he c'halloud, leun eo a vadelez,
Ar pezh en deus decretet ne revoqo james.

An diaoul a invantas e-unan he bec'het ;
An den nemert dre ali n'en deo bet decevet ;
Heman a vo redimet, mæs non as eguile.
Ne gavan netra justoc'h evit ar gondou-se

Me rayo voar ar poent-se moyen d'ho contanti ;
Mæs taulet plé dre avanç : ar rêson ne dle mui
Contesti lesen Doue ; eur veach ma parlant,
Ar rêson a dle tevel incontestablant.

Mæs ar feiz, emedoc'h-hu, a bropos da gredin
Mysteriou inconcevabl, ha me ne fell quet d'in
Contrarian ma rêson, nac ajouti creden
Da draou a so d'am speret imposubl da gompren.

Couls e ve d'ac'h lavaret ne gredet netra tout
Deus a guement a velet ; rac né hellet quet gout
Penaus ec'h ell al lagad guelet ar pezh a vel ;
Hennes a so evidoc'h eur miyster naturel.

Mil dra so var au douar ha traou commun-avoalc'h,
Ne hellet quet da goncêv : chom a ra ho tilac'h
Da c'hout penaus eo crouet ha formet peb-hini :
An natur e deus miret ar secret eviti.

Var rapport ho taoulagad o c'hredet couscoude ;
Perac eta disfiout deus rapport un Doue ?
Ho taoulagad ho tromplo, mæs Doue n'en rai quet ;
Ne hell na bezan tromplet, na tromplan den ebet.

Speret ar Sænt assambles, ha speret an Æle
Birviquen na gomprenont quement a voar Doue.
Penaus eta ec'h ellfe an den var an douar
Disolo he vysteriou, na sôndi he bouvoar ?

Ouspen se : ar mysteriou a dleomp da gredi,
Mar dint cals dreist ar rêson, n'en dint quet contrél del.
Pa ne vel quet ar rêson scleramant e vent faus,
Var goms Doue humblamant e tle en em repos.

Eur buguel prest da c'hênel, ha c'hoas en côf he vam,
Ma hellfen contan dezan eus eur vro nevez-flam
Ha carguet a varvaillou gret d'he recev ennan,
Hennes a ve, m'en assur, eur miyster evitan.

Rêson am be, couscoude ; ha pa ve deut er bed
Da gontempli e-unan an heaul hac ar stered,

Hac oll charmou an natur , neuse ec'h ansavfe
Em boa rapportet dezan conform d'ar virione.

Allas ! ni a so ive c'hoas en tevalijen ;
C'of hon mam eo an douar a so ous hon douguen.
Dre ar maro e teuimp da c'henel a neve ,
Ha neuse e comprenfomp scleroc'h comsou Doue.

Pa glevan tud dirèson breman o lavaret
Eo re goz an Aviel evit bezan credet ,
Hac ec'h eller contesti traou a deu a guen pell ,
Ne ouñ pe me dle respont , pe me a dle tevel.

An heaul biscoas brillantoc'h ne voe he sclerijen ,
Couscoude eo ar c'hossan deus ar grouadurien :
Lavaret a refet-hu eo re bell diousoc'h
Evit gallout assuri e sclera ac'hanoc'h.

An Aviel so ive sclerijen an ine ,
Doctrin an oll vertuziou , ha levr ar virione ;
An traou so merquet ennan , caer o deus bezan coz ,
Pa voant guech all arruet , n'en dint quet breman faus.

C'houi hac ho tud dirazoc'h , supposomp mil bloas so ,
A bossed eur gommanant a feiz vad en ho pro ;
Hac en a ve dereat dont d'he gontesti d'ac'h ,
Var digare eus re bell aboue m'eman guenac'h ?

Sul-gossoc'h eo ho tomæñ hac ho possession ,
Sul-legitimoc'h ive eo ar brescription ,
Dreist-oll pa oc'h eus titrou hac obtenet setañ ,
Var ar re o deus clasquet troubli ho jouissañ.

Evelse an Aviel , sul-vui eo ancien ,
Sul-vui e verit ive creañc ar gristenien ;
Sul-hirroc'h ma eo padet ha ma pad he zoctrin ,
Ha sul-patantoc'h ive e veler eo divin.

Ne'z eus artiel er Gredo n'en deo bet contestet
An eil goude eguile gant an heretiquet ;
Mæs gant o antetamant int tremenet pell so :
An Aviel so chomet hac ar memes Credo.

Peb neventi so eur c'hrim en doctrin an Ilis ;
A bep amser e veler chasseal deus he c'hreis
Piou bennac en he c'hreden a alteras netra ,
Eur guir , nac eur syllaben , memes un iôta.

Maleur , eme'n Abostol , mallos d'an den impi
A breseg un Aviel differant d'an hini
Am eus me preseguet d'ac'h ! ho preveni a ran ,
Ha pa ve un æl memes , ne gredet quet dezan.

Mæs perac , a repliqo aman tud insolant ,
Ne zeu quet Doue breman e-unan da barlant
Ous peb-hini ac'hanomp , evel a ræs guechall ?
Rac n'ez eus den oblijet da gredi un den all.

Evit respont en daou c'hir , goulennomp digantê
Hac en a gontrevener da ursou eur Roue ,
Pa ne zeu quet bep veach en he bersonnach propr
Da goms en particulier ous peb-hini he bopl ?

Eur rum tud a so hirie , ha varc'hoas eur rum all ;
Mar car peb rum pretexti un digare quen fall ,

Ar prinç eta a renço bezan bemde en hent
O colporti he ursou hep repos eur moment ?

D'ar Gonvansion e-unan e ve re a fatiq,
Mar renqfe eu em dransport a bez en peb distriq,
En peb bourg, en peb famill, var ar mæz hac en qær,
Da notifian deze quement decret a rer.

Mæs, salocroas, eur Roue, evel eur Republiq,
O deus en peb tribunal officerien jurdiq,
Da intiman o ursou d'ar rest o sujedet;
Maleur neuse d'an hini n'o executo quet.

Er feçon-se, Map Doue, quent quittat ar bed-mau,
En deus choaset ministret carguet da bublian
Ar maximou important deus ar silvidiguez;
Hac urs d'an oll d'o selaou evel Doue memes.

Ar soumission, ar respet, ar memes deferanc
Dleet d'al legislator, a so, en conscianç,
Dleet d'ar re so ive carguet deus he urso,
Pa'z eo guir ne labouront nemert en he hano.

Doue so oll-galloudus hac a hell, evit guir,
Parlant ousoc'h e-unan, hac herve ho tezir;
Mæs goulen se so injust, eur veach ma ousoc'h
Eo deus he beurs assuret ma parlanter ousoc'h.

Avanç n'oc'h quet obliget da gredi an dud all,
Eo disclerian d'ar publiq oc'h un original;
Rac nac a rapport bemde ne selaouet-hu quet,
Hac a gredet gouscoude, hep o bezan guelet !

Lennet oc'h eus martese histoar Spagn pe Bro-Sauz,
Ha biscoas n'oc'h eus credet ec'h allent bezan faus.
Rêson oc'h eus; mæs ive, n'en deus histoar ebet
Credaploc'h evit hini Legislator ar bed.

Remerquet pebes urs caer so er gronidiguez !
An heaul, tad ar sclerijen, o rei an de bemdez;
Al loar d'he mouamanchou ne vanqas quet biscoas;
Ar stered, ar firmamant attest eur C'hrouer bras.

Sellet ar pevar sêson oc'h arruout en poent,
Hac o laqat produi pep tra, herve o hent;
Anfin sellet endro d'ac'h, peb tra a brouvo sur
Un artisan oll-buissant, Crouer an oll natur.

*Fidelis sermo, et omni acceptione dignus: quod Christus
Jesus venit in hunc mundum peccatores salvos facere. T. 1.*

PEDERVET GUIRIONE.

DIVINITE AR RELIGION CRISTEN.

*.... Magnum est pietatis Sacramentum, quod manifestatum
est in carne;... prædicatum est Gentibus, creditum est in
mundo. 1. Tim. 3.*

N'ez eus netra da gredi er bed universel,
Mar deo ar Bibl supposet ha faus an Aviel.
Mar domp tromplet er poent se, eme un doctor bras,
Doue memes e-unan eo'n hini hon tromplas.

Daou bopl. privilegiet a ra profession
Da gredi eo revelet o diou religion.
An titrou a bresantont a so incontestabl ;
Un niver so a destou hac oll irrecusabl.

An daou bopl-man , couscoude , evel o diou lesen ,
Ne dlefant bezan contet nemert unan hepquen ,
Pa'z eo guir an eil lesen n'e deus quet abroget
Totalamant ar guentan , mæs perfectionet.

An assemble general deus an oll gristenien
Eo ar furan portion , ar savantan loden
Deus a oll dud ar bed-man , hep contestation :
Biscoas n'o deus meritet quen reputation.

Evelse ar Judevien , quent evit ar re-man ,
A voe deus tud o amser ar judiciussan ;
En creis ar bed idolâtr e voent , a re da re ,
Ferm el lesen naturel , fidel d'ar guir Doue.

Piou eo ar particulier a refuso credi
Diou nation quen reputet hac a offr testeni
Mil ha mil den vertuzus , an honestan , hep mar ,
Hac ar sclerijenetan a voe var an douar.

Al levriou religius , scrivet gant Moyses
Ha re an oll Brofetet a so c'hoas en hon touez ,
Hep falsification conservet gant respet
Abaque pevar mil bloas dre bevar c'horn ar bed.

En daouarn ar Judevien evel en hon re-ni
Emaint conform da velet. Impossubl eo prouvi

E ve ganemp na ganté chanchet eur guir hepquen :
Var se ne so entrezomp reproch ebet a grenn.

An oll ilisou christen , evité da veza
Var meur a boent disacord , o deus , ar memes tra
Conservet fidelamant ar pevar Aviel
Evel ma voent recevet digant an Ebestel.

Ar Sacramant adorabl hac an Avelou
A voa referet deze ar memes respejou
Gant ar gristenien guentan. Un torfet a vije
Alteri , na profani , na livran aneze.

Ma vije nac ajoutet , na supprimet netra
Er pevar Aviel , lavaret d'imp eta
Gant piou , pelec'h , peagouls , na perac an Ilis
N'e deus-hi quet abretoc'h santet an artific ?

An Ilis eo ma goarant , eme sant Augustin ,
Anes he autorite , nac en levriou divin ,
Nac en Aviel memes , n'em be creden ebet ;
Mæs var he c'homs impossuble eo d'in bezan tromplet.

Mar doc'h breman résonabl , bezet , mar plich guenac'h ,
Ar gomplesanç d'am selaou , ha me ziscoeno d'ac'h
Ne hellet quet , gant justic , supposi e ve faus
Nac an Testamant nevez , nac an Testamant coz.

Ar Bibl eo an archivou general deus ar bed ,
Histoar an Tadou quantan hac ar Batriarchet
Abraham , Isaac , Jacob hac he zaouzec buguel ,
A bere eo sortiet ar bopl a Israel.

Al levr-man eo an depot hac ar procès-verbal
Deus ar miraclou publiq hac extraordinar
A eure , abeurs Doue , Moyses hac Aaron ,
Da zelvran o breüder a zaouarn Pharaon.

El levr-man eo relatet hano ar famillou ,
Ar partach gret entreze , urs ar sacrificou ,
Tenor an offiç divin , ar goueliou annuel ,
An droat hac ar c'hustumou civil ha criminel.

Remerquet , en eur dremen , penaus an traou-man tout
A voe fontet en memoar hac evit rei da c'hout
Ar burzudou estonus a voe gret gant Doue
Evit tennan ar bopl-man deus he gaptivite.

Peb gouel bers , peb reglamant , peb institution
En em rapport d'ar miracl a voe'n occasion
Deus o etablissamant ; ha dre ar rêson-se
Ne hell den anzav eur poent ha recus eguile.

Mar doe'h eta antetet da revoqui en douet
Histoariou miraculus an Isrealitet ,
Eo quencouls d'ac'h , en daou c'hir , protesti a vremen
Biscoas pobl a Israel n'ez eus bet er bed-man.

Goap a vo gret ac'hanoc'h ; mæs hoc'h extravaganc
A ve insupportaploc'h , mar teufe d'ac'h avanç
E ve Doue incapabl da ober nep burzud :
Mar doe'h fur eta credet da desteni an dud.

C'hoec'h cant mil den , hep contan an oll dud ancien ,
Ar groaguez , ar vugale , a ia en eur vanden

Gant Moyses d'an desert , hac a so , a gredan ,
Testou avoalc'h da c'hoaid an den incredulan.

Daou pe tri den , martese , pa vent bas a speret ,
A heller c'hoas da dromplan ; mæs n'en deo quet æset
Tromplan un niver quen bras a velas alies
Hac a attest assambles miraclou Moyses.

Ar pezh so remerqaplan , ar Profet a scrivas
An traou dre ma'c'h arruent , ha memes var ar plaç ,
Hac o lennas alies d'ar bopl oll assamblet ,
Evit ne vije pretext a ignoranc ebet.

Hac e vije ar sant-man an trompler ar finan ,
Gant he oll finesseou , impossubl voa dezan
Rei da gredi da eur vro , d'an oll , bian ha bras ,
O deus elevet ha guelet traou ne veljont biscoas.

Penaus da c'hoec'h cant mil den gallout persuadi
O deus guelet en Egypt nao goalen a gast
Exterminan Pharaon hac he oll sujedet ,
Mar deo guir ne arruas gant hini drouq ebet ?

Var droad o deus , emezê , treuzet fonç ar mor ru ;
Ar Man hepquen o bevas daou-uguent bloas dioustu ,
Eur goabren o rene-hac en deiz hac en nos :
Penaus'ta o deus credet an traou-se , mar boant faus ?

Maro int gant ar sec'het ; hac , evit o recours ,
Moyes deus eur garrec a ra saillan an dour.
Coz ha yaouanq ec'h evjont deus ar memes sourcen ;
Un avantur quen publiq n'en deo quet eur fablen.

Doue, en creis ar gurun, a ra entent he vouez
 Divar mene Sinaï; ha tout en c'hlevont fres
 O publian he lesen: ne gollont quet eur guir;
 Red eo vijent oll sorcet, mar n'en deo quet se guir.

Mæs quement a dud sorcet a so marvaillou all;
 Ha marvail evit marvail, e ve red bezan dall
 Imaginan eur moyen a so impi ha foll,
 Da gontesti miraclou attestet gant an oll.

Ne avançan quet hirroc'h, rac ma intantion
 N'en deo quet ober aman un dissertation;
 Hac ar pezh, ispicial, a zisplich muian d'in,
 Eo renqout quen alies rei d'ac'h an demanti.

Mar queret lenn hoc'h-unan gant eur speret poset
 Levriou ar Scritur-Santel, e vefet distroet:
 Ne remerqfet quet ennê langach an tromplerez,
 Mæs langach ar virione hac hini ar furnez.

Dalc'het da examinan ha lennet pen-da-ben
 Doctrin an Hebreanet, hac e velfet ouspen
 N'ez eus quet eur figuren na memes eur chabist
 Ne gondou directamant da lesen Jesus-Christ.

Pa ve cavet ar Messi, e ve cavet ar sans
 Deus ar Man, an Oan pascal, an Arc'h a allianç;
 Isaac, Joseph, Jonas, an oll Patriarchet,
 A veler a so patant imach Salver ar bed.

Hennes just eo an alc'hoez a zigor hac a zer
 Intellijanç ar Scritur: hep hennes ne veler

En traou so profetiset na suit; na sclerijen;
 En default anzav hennes eo dall ar Judevien.

Anfin, an ton, al langach, ar maximou, ar styl
 Deus al levriou revelet, a ra guelet facil
 En deus ar memes Speret dictet an diou lesen,
 Hac eo an eil necesser da expliqan ebën.

Confrontet an Aviel gant ar brofetiou,
 Oll sacrificou Aaron gant ar guir Mysteryou,
 An Testamant ancien gant an hini neve;
 Impossubl eo d'ac'h doueti ne vent ouvrach Doue.

Daou vil bloas quent ma c'hanas Map Doue, hon Salver,
 Ar Brofetet a verque en termeniou quen scler
 He vuez hac he varo, he c'hloar, he bassion,
 Ma'z eo red ma parlantjent dre inspiration.

A bell lesen Moyses, a dost lesen ar c'hraç,
 A annonç en peb pagen ar memes Messias:
 Honnes dre figurennou a roe d'imp avis
 Ec'h arruje, hac homan en discoe gant ar bis.

Mæs fin so d'al lesen goz: ne so quet davantach
 Dirac ar realite ezom deus he imach.
 Mudal a ra an ecleau, pa ve tostet ar vouez,
 Pa deu an heaul da bara, ar squeud a dispares.

An donediguez divin deus ar Verb eternal
 E deus evit testeni miraclou quen reel,
 En quen bras nombr, quen aniat, ma forçont ar réson
 Hac an natur estonet da anzav int guirion.

Ar miraclou-man ive ne voent quet operet
 Diou pe daer guech hepmiquen en coach hac en secret,
 Mæz bemde publiqamant, hac en presanç ar re
 A garje o c'hontesti, mar vije possubl d'é.

Er guær a Jerusalem, ha partout tro voar dro,
 Hon Salver, hed he vuez, a eure burzudo;
 Hac he Zisquibien goude, armet deus he bouvoar,
 Ne rejont quêt neubentoc'h dre oll var an douar.

A Jesus a Nazareth ne voa dreoll quen brud,
 Ar re-dall, ar re vouzar, ar re gam, ar re vud,
 Gant eur guir deus he c'henou, a so rentet salo
 Deus o be leun a vuez e tenn ar re varo.

An êe, ar mor, an douar, an oll elemanchou
 A deu da executi promptamant he urson;
 An natur a obeis bep taul d'he volonte,
 N'en deus nemert un Doue capabl da ober se.

Ar c'hæriou ar re vrassan, evel ar re vunud,
 A voa memes re vian evit conten an dud
 En em gave d'he selaou; hon Salver a renque
 Mont voar ar mæz alies gant ar foul en heuille.

Ne voa quet he viraclou a admirent hepquen,
 Mæs santelez he vuez; biscoas na veljont den
 Quen humbl, quen carantezus, quen santel, quen parfet,
 Var he dal e voa peintet ar vertuz incarnet.

Millionou merzerien-deus peb bro, deus peb noad,
 Ha tud ar re sayantan o deus scuillet o goad

Quent renonç da Jesus-Christ; rac quen scler hac an de
 En he bersonnach santel e velent un Doue.

Mæs coms a rin-me aman deus furnez he doctrin?
 Homan a so quen sublim, ma renq bezan divin;
 Rac piou a vije capabl da rei d'ar c'hrouadur,
 Anes bezan he Grouer, gourc'hemenou quen fur?

An den gant he oll rêson ne voar quet da betra
 Attribui ar viser a andur er bed-ma,
 Na gout pelec'h ez ayo, nac a belec'h eo deut.
 Allas! deus ar virione ne vel nemert ar squeud.

Mæs doctrin Salver ar bed a expliq d'ar rêson
 Hon maleur originel, ar pris deus hon rançon,
 Excellanç hon ineou, planeden hon c'horfou,
 Natur an divinite hac hon oll deveriou.

Commandi a ra pep mad, difen a ra pep drouq;
 Ar recompanç a bropos, ar punition a zoug;
 O diou ez int eternal: pep tra a vo poezet,
 Eul lom dour roet d'ar paour, eur goms væn proferet.

Un disquib da Vap Doue a dle douguen he groas,
 Renonç dezan e-unan, caret an nep en cas,
 Renta'r mad evit an drouq, rei memes he vue
 Evit hini he nissan, pa vo necesser se.

Biscoas orgouill ar speret, na panchant ar galon
 N'o deus gallet invanti eur sort religion.
 An den, goude ar pec'het, a so re guisidiq
 Evit, anes graç Doue, he laqat en pratiq.

Deus an eil penn d'eguille, pa velan'ta ar bed
Soumetet d'an Aviel, chanchet, convertisset
Gant daouzec den, nonobstant ar c'hiq hac an natur,
E velan dorn ar C'hrouer o rên ar c'hrouadur.

Da ober an taul caer-man, n'o deus an Ebestel
Nac armeou, nac arc'hant, na talant naturel.
Mar senter ous o c'homsoù, anzavomp ar burzud :
Un Doue, dre o guenou, a gomse ous an dud.

Ne voe prometet deze, n'o deus recevet quen
Nemert trubiill ha croasiou deus an eil bro d'eben :
Mæs, en despet d'an ifern, d'ar bed ha d'he valiç,
Dre o goad hac o doctrin e fontont an Ilis.

An Aviel so cleuet hac en Nord hac er Sud,
An idolou discaret, an oraclou so mud ;
Rom anfin a so christen, hac he impalaer
A vel trec'h d'he armeou daouzec paour pesquetaer.

Pa gomsont, int comprenet en quement langach so ;
Pa gueront, int entetet memes gant ar maro.
Ar squeud anê, o tremen, a rent iac'h ar re glan,
Ha betec an ærouant deze a renq doujan.

Couscoude e protestont d'an oll a vouez huel
Int o-unan pec'herien, tud paour ha tud mortel :
Dre c'hraç Doue, emeze, hac en hano Jesus,
Non pas dreizomp hon-unan, ez omp quen galloudus.

En porchet Templ Salomon me vel Pêr arretet
Gant eur paour, biseoas camed na pas n'en devoa gret.

« N'em eus nac aour, nac arc'hant, eme Pêr, da rei d'id ;
» Mæs sav, en hano Jesus, divac'haign var ta dreid ».

An œuvrou miraculus hac extraordinar
A re Paol ha Barnabas, a roas da sonjal
D'an dud e voant daou Doue. Deja e proposer
Offr deze eur sacrific, ha sevel un auter.

Petra'ret-hu, emeze, tud foll ha diavis,
Rentan d'ar grouadurien enor ar sacrific !
Da breseg ar guir Doue omp deut en ho presanç ;
Crouet, prenet oc'h gantan ; roet dezan hoc'h ezanç.

Dre ar memes burzudou o deus o disquibien
Perpetuet an Ilis, astenet he domen,
Miret he Sacramanchou, ha gant fidelite
Conservet bete vremen an depot deus ar Fe.

Nan, nan ; ne hell quet Doue na prestan he hano ;
Na cedi he buissanç da laqat hon deceo
Dre dud quen religius, dre viraclou quen scler,
Dre un doctrin quen parfet, nac enpad queit amser.

Petra oc'h eus-hu breman da repliquan d'ho tro ?
En em glem a reet-hu eus fin d'ar miraclo ?
Ha pa ne velet pelloc'h hini gret gant Doue,
Ez oc'h tentet da gouezan en incredulité !

Ah ! petra leveret-hu ? ne ra miracl ebet !...
Piou eo'n den var an douar n'en deo en em gavet
Couls pe gouls deus he vuez en risq da berissan,
Anes un espeç miracl so deut d'en delivran ?

N'en deo quet da gontanti curiosite an den
E tle Doue implijan he c'halloud souveren.
Ma teufe ar miraclou da vezan re gommun,
Ne raent impression var daoulagad nicun.

Dre ma'z eo eur rallente, e teu't da admira
Pevar mil den en desert bevet gant pemp bara ;
Hac ar bed oll conservet ha sustantet bemde
Dre eur miracl continu, den ne ra van a se.

Doue'ta en deus sonjet difuni ar pec'her,
Ha discoen ar virione a amser da amser
Dre œuvrou dreist-naturel, pere ne vent prouvet ;
Evurus nep o c'hredo hep o bezan guelel.

N'en deo quet ar miraclou quen ral a ma sonch d'ec'h ;
Rac ne veler plaç devot freqantet en nep lec'h
N'o deve ar miraclou roet occasion
Deus o etablissamant hac o erection.

Mæs daou sort a remerquer operet gant Doue :
Darn a ra en he goler, darn all dre garante.
Dianzav he assistanç eo micher un ingrat,
Ha resistan d'he dauliu, hini eur scelerat.

Oh ! nac a dud a veler obstinet bete'r poent
Na den, na Doue pelloc'h ne fell d'ê da entent.
Un niver a viraclou a velas Pharaon,
Hini anê couscoude ne douchas he galon.

Miraclou a c'houlennet ! Mæs seiz pe eiz bloas so
Eman'r voalen a gasti astenet var ho pro ;

Hac hoc'h obstination, sivoas ! bete vreman ;
Eo deus an oll miraclou an epouvantaplan.

Ar bed a vel gant eston ar boan a guemeret
Evit bezan maleurus. An oll a so tentet
Da lavaret eo couezet mallos Doue var Franç.
Ha n'en deo quet ar re-se miraclou a venjanç ?

Arraget ous an Ilis, e carrac'h he dispen
A guichen ar men quantan. Couscoude birviquen
Ne deu't aben d'he discar : rac, dre eur miracl all ;
Doue, fidel d'he gomsou, a so ous he divoal.

En creis an debordamant eus a bep sort viço
A so ous he attaqi hac a attaq d'he zro,
Trahisset, disenoret gant darn he beleien :
Ha n'en deo quet eur miracl a so ous he souten ?

Puissanç ar rouane, autorite ar bed
A hell varian, sivoas ! test ar pezh a velet
Arruet en ho contre. Caer so politiq,
An oll lesennou humæn so sujet da fazian.

Mæs an Ilis Catholig ne deus quet trivilet ;
Fidel d'ar memes doctrin, biscoas ne deus dictet
Gourc'hemmen pernicious, na decision control :
Red eo e ve conduit gant ar Speret-Santel.

Abaoue trivec'h cant vloas betec an heur bresant,
Ordinal persecutet ha bepret triomphant,
E ra d'he adversourien verifian bemde
Pronostiq an Aviel, promesse Map Doue.

Me er goarant, emezan, an Ilis, ma fried,
En deus evit fondamant ar roc'h hac ar garrec;
Oll-buissanç an ifern ne drec'ho quet varni;
Bete fin an oll amser bepret me vo ganti.

Cesset eta, tyrantet, rac poan collet ho pe
Essa beuzi an Ilis en goad he bugale:
Ar goad pur-se a squillet eo ar greun hac an had
A beuplo c'hoas an douar deus a gristenien vad.

Caer en deus an avel foll hac ar mor tourmanti,
Bag Pêr na rai quet naufrach. Pa deuyo da galmi
Reus ar bersecution, e tiscoeno he fenn
Evel an heaul pa zispaq dimeus a eur goabren.

James an heaul biniguet nie baoues da vrillan:
El lec'h all e ve savet pa ve cuzet aman.
Ar Feiz, evel an astrou, caer so en em oppos,
Eclipsset en Oriant, a squeud en Hanter-Nos.

Commanç a eure paran en Asi, en Afriq,
Ha breman deus an Europ e ia d'an Ameriq.
Deus a Franç e tremeno, martese, en plaç all,
El lec'h ma vo recevet ha gant frouez ha gant mall.

Pourmen a ra he goulou dre bevar c'horn ar bed;
Deus he sclerijen divin pa ne brofiter quet,
E diles ar bec'herien, ec'h abandon o bro:
Divoallet, ma brois paour, ne ve arru ho tro.

Ar Bastoret-se memes oc'h eus forbaniset,
A so gant ar Brovidanç, martese, destinet

Da gass hano Jesus-Christ en touez ar bopl païen
Alies maleur eur vro a ra boneur eben.

Justic Doue a-unan gant he visericord
A les darn ar bec'herien da berissan er port,
Hac a bourve assistanç d'ar re so er mor bras.
Adoromp he oll-c'halloud ha menajomp he c'hraç.

Piou a lavarje d'imp-ni, dec vloas so tremenet,
Neuse c'hoas, en apparanç, e voamp Catholiquet;
E vije, abars neubeut, gret ousimp an difen
Da vezan, da gaout memes an hano a Gristen!

Cetu ni rentet enon, ha guir ne leverer,
Allas! hac a neubeudou en em accustomer
Da dilesel pratiquou ar guir Religion
Evit heuill nevention impi ha dirêson.

Entretant an drouq-speret a avanç he labour;
Caout a ra tud d'he selaou, ha darn all d'en sicour;
De-ha-de ar goall exempl, sivoas! a c'honezo,
Ha pa dilesimp Doue, Doue hon dilesio.

*Vidit Dominus, et ad iracundiam concitatus est: et ait:
Abscondam faciem meam ab eis... Ipsi irritaverunt me in
vanitatibus suis, et ego in gente stulta irritabo illos.. Can.
Moy. Deut. 32.*

PEMPET GUIRIONE.

REFUTATION AR VELEIEN SERMANTET.

*Si autem Ecclesiam non audierit, sit tibi sicut ethnicus
et publicanus. Math. 18.*

Tristan generation, ma Doue, eo homan !
Guechall, ferm ha courajus, ar gristenien guentan
A ie d'ar verzerenti, quent supporti biquen
Chanch an disteran artiel deus an doctrin gristen.

Breman en e ranverser adal he fondamant,
Ha couscoude d'he difen nemeur n'en em bresant.
An oll a vev disourci, hep na feiz, na lesen,
Bete ma hello divoal peb-hini he voyen.

Eur belec touer bennac a leser c'hoas er vro
Da ober he abostol ha da goll ineo ;
Mæs grai evel a garo, scuisan a rer gantan ;
Nep a glasq lazan he gui, a lavar ez eo-clan.

Aman eo ho cortosen, beleien sermantet :
Poent eo rei d'ac'h eur guentel ; mar ne brofitet quet,
Ar bopl fidel, martese, a briso ma selaou :
O interest eo gouzout gant piou eman ar gaou.

Pa voamp-ni ous en em glem ec'h attaquet ar Fe,
C'houi bretante, er c'hontrel, breman e devije
Mui a lustr hac a enor, hac e voa'r barados
Digor franq, gant m'ho pije peb-hini eur baros.

Mæs avoui a renquet en ho confusion,
Mar man ar schism en Iis hac ar viç var an tron,
N'ez eus den caus nemerdoc'h, hac en fin ar c'habal,
N'en doc'h quet guelloc'h tretet evit ho preudeur all.

An ignoranc, an orgouill, ar goall gomportamant
O deus dallet ac'hanoc'h da ober ar sermant.
D'abord oc'h bet regalet, meulet, salariet,
Ha breman oc'h miserabl, rebulet gant ar bed.

An dud honest, gant rêson, a deu d'hoc'h evitan,
An dud fall d'ho pouffoni, goude c'hoas ho tromplan,
Hac ho conscianc bemde a so ous ho piqat.
Tristan desolation ! insupportaplan stad !

Ne ret pelloc'h eur c'hlerge, nac un urz distinguet,
Ne zouguer d'ho caracter nac enor, na respèt :
En un ilis polluet, mar gret fonctionou,
Ne gonfier quet ennoc'h memes ar registrou.

Da annonc hoc'h offiçou ne sôn mui ar c'hleyer,
Quen bras eo ar gasoni, quement e tetester
Betec ar fals meulodi a rentet da Zoue !
Anfin, gant ho soutanen ne hellet mui bale.

Evel pa ve mez anzav ar Mestr a servijet,
Oc'h oblijet da zouguen en coach hac en secret.

Corf precius un Doue , hep na croas , na letern ,
Pa ho pe , dre sacrilech , lavaret an offern.

D'imp-ni e ve d'en em glem ; mæs d'ac'h-hu , salocroas :
C'houi dle tremen dre enon , pa oc'h eus gret ar choas ,
Hac al le da accepti , hep reservation ,
An oll decrejou impi deus ar Gonvansion.

O Jesus , oll adorabl ! mar deu't da renian
Dirac ho tad eternal piou-bennac er bed-man
A ruzio en ho servich , petore tretamant
D'ar belec a renonç d'ac'h memes dre eur sermant !

Ne dlefen quet mont hirroc'h da brouvi grevustet
Eul le quen abominabl ; couscoude , mar queret ,
Me a offr da exposi scleroc'h ar guestion
Dre boez an autorite hac an discussion.

En un affer important , maxim an oll dud fur
Eo quemeret ar barti a so muian assur ,
Ar barti legitiman , an hini adoptet
Muian generalamant en scol an doctoret.

Ma vijac'h en em reglet gant ar memes prudanc ,
Ho poa guelet ar sermant refuset crenn en Franc
Gant cant Escop ha tregont , gant ar muian mouezio
Hac an niver habillan deus beleien ho pro.

D'an neubentan e tleyec'h consulti levriou mad ,
Goulen avis tud savant , heuill exempl ho Prelat ,
Sonjal ho poa prometet en ordination
Pep fidelite dezan , ha pep soumission.

Ne'z eus nemert un Doue , eur Feiz hac un Ilis ;
Mæs facil eo d'ac'h entent , ma hellfe tud Paris
He reformi bep daou bloas dre actou fantasiq ,
E ve guelet , hep dale , un Ilis bep distriq.

Cesar en deus he zomen , an Ilis he hini :
Droat an eil var eguile ne dle quet usurpi.
Ar stol a so d'an Ilis , da Cesar ar c'hleze ;
Heman a ren ar c'horfou , hac eben an ine.

Salver ar bed a roas hepquen d'an Ebestel
Ar presidanc en Ilis , an dalc'h spirituel ,
Ha da Bêr an alc'hoeziou , ar garg hac ar sourci
Da c'houarn ar Bastoret evel er bergeri.

Ne hellet quet ignori eman'r memes pouvoar
Gant o'oll successor et bepret var an douar ;
An Esquibien so breman en plaç an Ebestel ,
Hac ar Pap en plaç sant Pêr , viquæl universel.

Ar Pap so deus an Ilis ar men fondamantal.
Inutil eo d'ac'h essa batissan var un all.
An Ilis eo'r guinien , ar Pap eo ar souchen ;
Ar branq distag ac'hane ne ra mui pourseven.

Ar Pap hac ar Preladet a form an tribunal
Infaziabl eus an Ilis. Ar poliq general
O deus eus ar gristenies ; deze e referer ,
Pa ve abus da lemel , pe reform da ober.

En hent ar silvidiguez , hep risq d'en em dromplan ,
Dre'r rout o deve merquet , an oll a dle marchan ;

Rac deze eo promettet, pa gomsont a eur vouez ;
Ar speret a virione, a ners hac a furnez.

Deze eo ec'h apparchant ober ordrenançou,
Instrui publiqamant, accordi dispançou,
Delegui ar Bastoret, hac ordren gant justic
An implic'h so da ober deus madou an Ilis.

Deze eo ec'h apparchant prononç var ar vœuyou,
Squei an excunuguen, regli an offiçou,
Interpreti ar Scritur, ha fixan ar greden,
Formi o bergeriou ha choas o beleïen.

Un Escop a so galvet evit un dioces,
Eur Person da eur barous, eur Belec da goves ;
Ne hellont quet exerci, anes an depri mad,
Ar re-man deus o Escop, an Escop deus ar Pap.

Evit bezan gret Belec, n'en doc'h quet c'hoas Pastor ;
Ha pa arrufac'h enon, antreet dre an or,
Ha dre approbation ho superioret,
Non pas dre election eur c'hlub hugunodet.

Biscoas decret an divorç n'en deo bet eur rêson
Da un den da gaout diou vreg ; nac hoc'h election
Ne ro quet ; d'ac'h quen neubet an droat da sourcial
Deus parous hoc'h ameseg, nac eus denved re all.

An Ilis ous ho recev en renq he beleïen,
Da certen fonctionou ho teputas hepquen
Evit eur certen amser hac en eur certen lec'h :
Ne dleyec'h quet mont hirroc'h, pa ne bermette d'ec'h.

Ne ro quet an alc'hoeziou hep rêservi an droat
Da reclaimi adarre evit rêsonniou mad ;
Ha pa'z oc'h en he c'henver coupabl a drahison,
E lanc ive'n hoc'h enep an interdiction.

Eur belec goall renommet, mar der d'he offeren,
Ne bec'her quet ; ha memes, pa ro an absolven,
He absolven so valid, en queit ha ma consant
An Ilis he approuvi ; mæs non pas autramant.

Ar c'han a ro dour yac'hus hac a zalc'h da redeq,
Pa ia betec ar sourcen ; mæs gout avoalc'h a ret
Pa ve distro ac'hane, e chom da zizec'ha :
Inutil eo d'ac'h goulén digantan da evan.

An Ilis eo ar sourcen, ar belec eo ar c'han ;
Mæs ar belec separèt dre he le e-unan
Deus communion an Ilis, adieu d'he bouvoario ;
Ne ro mui dour ar vuez, mæs hini ar maro.

An affer so decidet : Rom a verq'en he bul
Eo hoc'h oll fonctionou pe sacrilech, pe nul ;
Eo ho constitution carguet a heresi,
Ho minister schismatiq, hac ho sermant impi.

Na c'houi, nac ar faus esqeb o deus ho teleguet,
Nac hini ar veleïen o defe ordrenet,
N'en doc'h netra en Ilis : n'oc'h eus commission
Nemert abeurs un decret deus ar Gouvantion.

Mæs, ar puissanç civil, na nep galloud humaen
N'o deus bet var an douar droat da rei absolven ;

Êt eo ar Gonyantion eta cals re vuan,
Rei d'ac'h un autorite ne deus quet e-unan.

Na Synagog ar Judee, nac ar Senat romen,
Nac Areopach ar Greç, n'o deus gret Esquibien :
Couscoude en o amser, hac en despet deze,
E voe fontet ar c'hentan Ilisou deus ar Fe.

Dindan lanç an tyrantet, hac hep o chonsulti,
E conferet an urzou, e voa red deputi
Ar Bastoret d'ar c'houlse, evel a lenn an oll
En Actou an Ebestel, en Lizerou sant Paol.

Hierarchi an Ilis hac he oll degreou
A so quencouls revelet evel ar mysteriou.
Refus credi ar re-man eo bezan heretiq,
Ha disanaout ar re-se, eo bezan schismaticq.

Deus ar schism d'an heresi n'ez eus nemert eur pas,
Hac ac'hane d'an ifern a so neubeutoc'h c'hoas :
Unan a zistruch ar Feiz, un all ar Charite.
N'ez eus quet a varados hep an diou vertuz-se.

Ne ouffen a guement-man citan d'ac'h guell garant
Evit ar Scriptur-Santel hac ar C'honcil a Drant.
C'houi oc'h-unan ganemp-ni ho poa, bete vreman,
Ha credet ha preseguet ar guirioneou-man.

Derc'he'ta da assuri n'ez eus netra chanchet
Ebars er Religion hac oc'h Catholiquet,
Ha ministret d'an Ilis evel ma voac'h guechall,
Eo langach un ignorant, pe un den a feiz fall.

Eur paysant, eur buguel a voar he gatekis,
A brouvo d'ac'h en daou c'hir n'en doc'h mui en Ilis ;
Rac, mar goulén diguenac'h a belec'h e teu't-hu,
Nac a bes autorite, petra respontfet-hu ?

Deus a Baris, emedoc'h, ha deus abeurs tud liq,
O deus lazet o Roue ha gret eur republiq,
Revinet an dud honest, chasseet o esquibien,
Ha gret un Ilis neve pemp bloas so hepmuiquen.

Ar buguel a responto : Ha ni so deus a Rom,
Deus abeurs an Ebestel. Evit bezan o chem
Hon Pastoret en exil, o denvet omp bepret :
C'houi a so schismaticq, n'oc'h anavezomp quet.

N'oc'h eus na Pap, na Concil, emezan, d'hoc'h ansao ;
Renoncet oc'h eus deze, ha memes d'an hanô
A Bastoret Catholiqu, evit caout an hini
A gonstitutionel. pebes apostasi !

Gant tud liq oc'h bet choaset, ha diæs gout gant piou,
Rac eur pañan, eur judeo, ha tud a bep sort liou,
Gant ma vint citoyanet, ha pa vent divade,
O deus, herve an decret, o mouez en assamble.

Ar bleiz en touez an denvet, al laer er bergeri,
Ne zeu, eme hon Salver, nemert da zevori ;
Hep agreman an Ilis, en ho fonctionou
Ne reet ive, sivoas ! nemert coll ineou.

Pemp bloas e deus hoc'h Ilis ; anat eo gout ervad
Ne deo quet abeurs Doue, pa ne deus hirroc'h dat ;

Mæs œuvr an antechristet, repu ar volerien :
Er bed oll mez eo'n anzav, nemert en Franç hepquen.

Hon Ilis-ni so fontet daou vil bloas so deja,
D'ar memes chef a lesen e talc'h hep varia ;
Dre-oll eman disperset ; d'an oll e tisq an hent
Eus an ée, ha nemerti ne hell produi sænt.

Collet eo hon Pastoret ; mæs Doue o c'havo,
Pe a suscito re all en o flaç, pa garo.
Meur a bersecution a so bet quent homâ,
Ha bepret ar guir Ilis so chomet en he za.

Ar schism a ra mil ravach ; mæs piou a so da vlam
Nemert hoc'h ambition hac ho sermant infam,
A rent ac'hanoc'h hanyal ous Luther ha Calvin,
Hac ho separ eveltê deus an Ilis latin ?

Ar Judevien ne glasquent ober d'an Ebestel
Noaz ebêt, gant ma rajent promesse da devel ;
Mæs, salocroas, emeze, mervel quent a ve red :
Just eo senti ous Doue en preferanç d'ar bed.

C'houi, sivoas ! a ra leou hep nombr hac a bep spec,
Prest da goms, prest da devel, prest da livran memes
Titrou ho peleguiach evit heuill an idol,
Prest da laçat an turban quen buan hac ar stol.

Evit hoc'h antre quantan oc'h deut en hon templou
Evel Judas er jardin escortet a drouplou ;
Hac o sonjal profitan, oc'h eus guerset ive
Hac ho mam hac ho preuder d'ar Synagog neve.

Pell so deja eo douguet ar setanç hoc'h enep
Gant ar Pap hac an Ilis, ha n'o selaouet quet.
Mar gouzoc'h an Aviel, mar priset c'hoas en lenn,
Clevet-an ous ho quervel quellies a baïen.

Pebez quentel evidoc'h, ma breuder egaret !
Mar deo diaes supporti rebechou quen calet,
Sonjet ho po da recev en tribunal Doue
Effroyaploc'h gourdrouzou, mar marvet en ho le.

El lec'h eta dimezi, na douguen an armou,
Ah ! sqoet var boull ho calon ha fontet en daerou ;
Goulennaet digant Doue graç ho conversion,
Ha gret pinijen publiq da obten ho pardon.

Exposet en em guevfet, martese, dre eno
Da vezan persecutet ; mæs eur moyen ho po
Da baeen justic Doue. Allas ! bete vremâ
Quement oc'h eus anduret ne servich da netra.

Deja oc'h bet condaonet d'an arrestation.
N'oc'h eus mui na paeamant, na retribution
Nemert hoc'h offerennou da vagan paourente ;
Na vefet quet goas tretet ha pa dorfac'h ho le.

Sellet ped rouantelez a so collet en Nord,
Sivoas ! dre antêtamant schismatique ho sort !
Er maleur-se, m'ho conjur, ne drainet quet ho pro ;
Distroet : c'hoas dor an Ilis so digor d'ho receo.

Breman, dre un dislavar pront hac edificiant,
E rofet gloar da Zoue, d'an oll contantamant,

Reparation d'an Ilis, plijadur d'ho preudeur,
Ha squer vad d'ar bec'herien da guittat o erreur.

Mæs, mar daleet pelloc'h, e velfet de-a-de
Ar schism memes o couezan, Franç o chom divade;
C'houi oc'h-unan hep auter, na templ, na fonction.
Petra servicho neuse ha retractation!

Allas! nep a ra divorç gant an Ilis, he vam,
Ne vo quet Doue he dad; mont a rai lam ha lam,
Hac a erreur da erreur e couezo, hep dale,
Er precipiç tevalan, en incredulite.

Mæs c'houi, Pastoret fidel, memes en hoc'h exil,
Ho fonctionou divin a vo bepret util;
Ho puez edificiant a c'hoñezo bemde
Da Zoue servicherien, d'an Ilis bugale

En sanctual ho calon me ho cleve o c'houlenn
Bezan en touez ho preuder galvet da anathem
Gant ar memes carante evel guechall sant Paol,
Bete n'ez ayo hini deus ho tenved da goll.

Avechou gant Moyses, divar crec'h ar mene,
Hac ho taouarn goureet, e suppliet an ee
Da ranversi Amalec, a fell dezan oppos
Ne antrefe Israël en douar he dud coz.

Mæs, pa bignet d'an auter, e cresq ho carante;
Enon, calon ous calon, e comset ous Doue,
Hac, evit crimou ar bopl, ho requet divezan
Eo dont ive gant Jesus d'en em sacrifician.

Courach eta, Pastoret, evel deiz an diluch;
Conservet en arc'h Noë, oc'h eus cavet refuch
En Bro-Saoz, el lec'h biscoas ne gredjec'h diaguent;
En Bro-Saoz, a vo diou vech hanvet Enez ar Sænt.

O Saozon! tud generus! Samaritanet mad!
Gret vo deus ho charite eur memoar enorab,
Hac eur chabistr en histoar. Graç d'ac'h da gaout ouspen
Ar guir Feiz da recompanç evit hoc'h alusen.

O Roue! dign da c'houarn eur bopl compatisant;
Georch, mar be anterinet hon pedennou fervant,
Pinvidiguez an douar ha faveuriou an Ee
A vo saler ta vertuz ha partach ta ligne.

Partiet, va Ebestel, eme Salver ar bed;
Annoncet ma Avel, ha n'en em nec'het quet
Evit hoc'h antretien; me a laqai pourve
Pep tra d'an nep a glasqo Rouantelez an Ee.

Er gout a ret, ma breudeur, en Franç e voa dessin
D'ho laqat da berissan er môr pe dre famin;
Mæs, a drugare'r Saozon, ha graç d'ar Brovidanç;
Cetu c'houi hep dienes hac oll en assuranc.

Hoc'h exil en un triomph evidoc'h so chanchet,
Hac ar bersecution, en mez ho tyrantet,
A servich da bublian d'an oll nationo.
Ha santelez ho puez, ha fallente ho pro.

*Deus nos novissimus ostendit tanquam morti destinatos :
quia facti sumus spectaculum mundo et angelis et homini-
bus. Ad Philip. Cap. 3.*

C'HOECHVET GUIRIONE.

DISURZOU AR GOUARNAMANT.

*..... Veloces pedes eorum ad effundendum sanguinem.
Contritio et infelicitas in viis eorum, et viam pacis non
cognoverunt. Psalm. 13.*

PERAC n'en don me clevet er c'hoste all d'ar Manch,
Pa hellan d'ar virione rei breman he revanch ?
Me grife a vouez huell : Bretonet, Bretonet,
Discuiset deus ho crimou, me ho ped, selaouet :

Ah ! pegueit ho cuelin-me o tale hoc'h amser
Da selaou tud etourdi, gant résenniou dister,
Oc'h ober o doctoret hep gout o A, B, C,
Hac o goms gant insolanc deus an divinite ?

Dre avanç em eus prouvet int hugunodet pur,
A sel evel un netra ar blasphem, ar parjur ;
Mæs c'hoas int affronterien ha guir charlatanet,
A ra goap en o c'halon deus ar citoyanet.

A dra sur, bete vremen n'o deus gret netra quen
Nemert tromplan ac'hanoc'h dre bromesseou væn
Deus a eur prosperite birviquen ne arru
Nac em amser-me, sivoas ! nac en hoc'h amser-hu.

En queit ne vezo casset d'ar stadou-general
Nemert tud o deus laeret madou national,
Jacobinet averet, tud hep religion,
Biquen en Franc ne velfet nemert division.

Hep enor na santimant o deus prenet moueziou,
Pa voa quistion da vezan impliet er c'hargou ;
Hep justic na lealdet e versont goude se
D'an eil he liberte, d'eguil he vue.

Ar bed oll a so collet en Franc, mar o c'hreder ;
En heur ma'z ai digante an dorn hac an ober ;
Hac evit derc'hel o fost, e publient bepret
E ve ar vro en danger, pa ne ve risq ebet.

An dud credul ha timid n'o deus quet a amser
Da examinan pelec'h eman o guir danger ;
Den ne flach, den ne remu, allas ! hac entretant
E talc'hont dre gontinu an oll dindan o dant.

Couscoude mar so danger, piou a dlefe crena ?
N'en deo quet c'houi, ma brois, rac ne risquet netra,
Nemert bezan eurussoc'h, mar-g-arru chanchamant ;
Hac ar c'hentan ar guellan, se a so evidant.

Mæs ar cheffou principal, an assassinerien
O deus gret hac a ra c'hoas maleur ar Francisien ;
Just eo d'ar re-se crenan : gout a reont erfad
A gouezo venjanç varné abred pe divezat.

Aon o deus, pa retorno an armeou d'ar guær,
Pe re sammet a laure, pe scuis gant ar viser,

N'o defe ar fantasi, martese, alafin,
Da chanch buguel er c'havel, pe bas var tabourin.

Cetu enon ar rêson ma tifferont ar peoc'h,
Quen a vo exterminet an tri ferz ac'hanoc'h,
Evit ma chommo gante ar pezh o deus laeret,
Ha quitted da bartaji gant ar re decedet.

Eet neuse gant confianç, eet ermes ho contre
Da laqat en em lazan evit tud ar sort-se !
Mar deu ganec'h ar victoar, e vefet aviet ;
Ha mar collet ar gombat, ez oc'h disgraciet.

Touet o deus da gasout an oll rouane all !
Var guement se o design eo douguen an tan-goall
Deus ar revolution en pevar c'horn ar bed.
Labour ho po, ma brois, nemert commanç ne ret.

Popl ebet var an douar ne hell a zevri vad
Ober gante un trete nac un accord da bad :
Rac, el lec'h pacifian, ne glasqont, er c'hontrel,
Nemert brouillan ar c'hartou vit asten ar bresel.

Gout a ouzont maniviq alaouri o c'homsoù,
Rei d'ar viç liou ar vertuz, ha clasq troïdellou
Da essa justifian dirac tud imbicil
Hac ar bresel estranjour hac ar bresel civil.

En termeniou bombançus e reont an detail
Deus victoarion dibrofit ; mæs na guennec na mail
N'o deve ar soudardet evit o faeamant,
Ha, pa ve lazet dec mil, ne gontet nemert cant.

Da rei beus d'ar ganailles, e leveront deze
Eo deus ar bopl e tepant an oll autorite ;
Ha couscoude e veler violi hep rêson
O droajou naturellan, droat o election.

Pa ve choaset tud honest evit mont da Baris,
Mar goulennont netra just, int casset var o c'his ;
Hac alies deportet var un douar a dan
Da c'hrillan, pe da bastur sauvajet ar Guyan.

Ar memes rum a gommand, eman o zroad er sqleuq,
Na bourc'his, nac artisan, na digentil na cleuq,
N'o deus guir da lavaret. Caer a so en em drei,
Ar bopl a ia ordinal eun en guenou ar blei.

Dindan an hypocrisi deus o fraternite,
E vagont an disfianç hac an duplicite.
Un arme espionet a so bemde var droad
Da glasq tud da bunissan, pa ne ve den coupabl.

Detestaplan assamble ! Injustan tribunal !
N'o deus na religion na vertuziou moral.
Pillach ha sacrilechou, ne c'houlennont quen roll ;
Impi en quenver Doue ha cruel ous an oll.

Dre eur jujamant secret deus a venjanç an êe,
Mæs sansibl d'an nep en dens c'hoas eur greunen a fe,
E veler e recevont ar memes tretamant
O deus laquet ar re all da souffr injustamant.

Ar jalousi, ar massacr, n'en deus quen entrezè,
Rac an eil goall aneval a zevor eguile :

Dallet gant ambition, peb-hini 'nê d'he dro
A gas, evit bezan mæstr, he gonsort d'ar maro.

Aboue m'emaint en Paris, eur vez eo o c'hompren,
Ar faction so crenvan a extermin eben,
Ha caer a so chanch mæstrou, bepret renq ar gommun
Rei d'ê quement a c'houlont da ober o fortun.

N'on ped constiution so bet var an tapis,
Pep assemble a bretant ober unan d'he guis;
Ha goude mil le touet da vezan fidel d'ê,
Dre guellies a barjur ec'h abroger anê.

Er mis-man eo permetet digueri an ilis,
Er mis all e teui difen da ober nep offiç;
An hini ra en ilis hirie charivari,
Varc'hoas, ar system chanchet, a velfet o pidi.

Da guentan e voat forcet da vont d'an offeren,
Goude so bet un amser ne avanture den
Mont dei nac he celebri; breman eo permetet,
Gant ne vet quet catholiq, bezan pezh a guerfet.

Gant ar gonstitution e voac'h bet borodet,
Breman gant ar republiq ez oc'h tout arraget;
Trei a ret da bep avel evel gilouedou,
Hirie sænt en apparanc ha varc'hoas diaoulou.

Gant ho touerien quantan e voac'h schismaticquet;
Gant an eil rum e renquet bezan heretiquet!
Breman e rer d'ac'h renonc da bep religion;
Ne ran souez, n'eus hini a guement n'ho condaon.

Da guentan e pretante tud an intrusion
Bezan'n despet d'an Ilis, en he c'hommunion;
Ha breman e pretanter, en despet da Zoue,
Rentan, dre idolatri, enor d'he vajeeste.

Avechou e leverer, pa vo fin d'ar bresel,
E vo roet liberte d'ar Bastoret fidel;
Mæs neuse e vo forjet mil ha mil teodad fall,
Pe d'o ampech da retorn, pe d'o adchasseal.

D'ho tromplan 'ta, d'ho tallan eman'r brud en publiq,
Eur veach diazezet da vad ar republiq,
Ar Religion adarre a deuyo var he guis;
Rac, mar doc'h er greden-se, oc'h meurbet diavis.

N'oc'h eus quet mui a rêson evit n'oc'h eus a fe
Ma lavarfet en Paris e ve nos da greiste,
Ha c'houi gredfe contesti? Touet oc'h eus selaou
Artisantet ho maleur ha doctoret ar gaou.

En conscianç, ma brois, hac en a voe biscoas
Un doctrin quen sacrilech, eur gouarnamant voas;
Un tribunal quen indign? Ne gredan quet er fond
Ne avezan hini var an douar tro-rond.

Bet o deus an insolanc da brometi d'ar bed
E vije'n oll evurus, pa o dije laquet
LIBERTE, EGALITE, daou dra quen imposubl
Evel prejudiciabl en queit a ma vo tud.

Avis a ra d'in clewet un eil guech ar serpent,
Evel ous honn zud quantan, ousoc'h oll o parlant.

N'ho po na mæstr nac autrou ; immortel , emezan ,
Ha squient tout e vefet , mar debret ar frouez-man .

Guir vugale da Adam , credet oc'h eus ractal
Bezan ive doueou , rentet libr hac egal ;
Eet gant ar vez da guzat , . . . a vremen a velet
Oc'h en noaz evel Adam , eveltan decevet .

An ners , ar vent , ar iec'het , ar madou , ar squiant
N'en dint quet distribuet d'an oll egalament .
Ac'hane , ma brois paour , ho projet so manquet :
Crec'h ha traon , mæstr ha mevel so necesser er bed .

Refus a ret an hommach da noblanç ho contre ;
Mæs plegan renquet breman gant laëron o danve ,
Hac ar brassan rapiner en deus ar pas arauc ;
D'an nep en deve madou e ve lamet an toq .

Ne voa quet an dud-chentil a voa d'ac'h da damal ;
Mæs recevourien injust , procurerien fiscal ,
A revine ar gouiquen , hac a ben fin ar gont
O deus chasseet breman an autrou deus he fond .

Avocadet coll-causou , judevien reneet ,
Marc'hadourien fouet-boutiq , commisien divroët
Ha quement distoladen so nevez deut en Franc
A so breman autrone ! Doue , pebes noblanç !

Evel chass ar guiguerien endro da eur charin
E velan Franc exposet d'ar scrab ha d'ar rapin .
Fortun a rer en un deiz gant faus assignajo :
Ar pillach a so digor !.. Deut an nep a garo .

Da savetei o buez an dud honest breman
A abandon o moyen hac a renq emigran ;
Tud goloet a vïcou a arru a lec'h all
A so tretet gant enor ha pinvidiq ractal .

An oll gargou so gantê hac ar maniamant
Deus ho madou , Francisien , ha deus hoc'h oll arc'hant ;
Darn a zalc'h ha darn a guign , hac entre o daouarn
Al loën goude he groc'hen a les c'hoas he houarn .

Eur menez aour hac ar arc'hant a ve gret hep doutanç
Deus a vadou ar c'hlerge , ar venac'h , an noblanç ,
Ha re ar famil royal , ar presantchou civiq ;
Ha ne renter cont ebet aneze d'ar publiq .

Clem a rec'h var an taillou , mechanç ho poa réson ;
Guelet a ret-hu breman nep diminution
Nemert en ho pugale ? ho trafiq , ho micher ,
A renquet da zivoeret dre ma cresq ho miser .

Darn an taxou supprimet a retorn var o guis ,
Tout a renquet da brenan digante'n o divis ;
Hac ar re a zilerc'ho a retorno ive
Pa droyo en fantasi ho tyrantet neve .

Er gommençamant quantan , da laqat ober brud
E voe pris ar guin-ardant diminuet d'an dud ,
Permettet lazan gibier , lamet ar such milin ,
An tennadec d'ar billet ha dever ar butin .

Mæs , el lec'h diminui , eo triplet an taxo ,
Bemde e rer re nevez da beur-samman ar vro ;

Deja e ve goulennet ar ialc'h pe ar vue,
Hac ar prest, pa ve forcet, a so hanval ous se.

Mæs ho maladen breman ne ra quet guell rapport;
Breman var boez he collier, ha non pas dre ar sort,
Oc'h var iun ha diarc'hen conduit d'an arme :
Quen mad eo d'ac'h ho putin ha risqus ho chasse.

Menel a ra al labour, pe ne chom den er guær,
Ar c'honverç so eet da fall, ar bevan a so quer;
Paper eo oll voneiz, ar Gonvansion ho pill,
Ha c'houi ne chom guenac'h quen nemert daerou da scuill.

Musuret eo d'ac'h ho creun ha poezet ho para;
Goude dastum hoc'h estou n'en doc'h maestr da netra.
Roet ho tud, ho loenet, pe ec'h er d'ho poursuiou,
Ha c'hoas, mar en em glemet, divoallet dirac piou.

Eus ho tevezourien, eus ho querent nissan,
Eus hoc'h oll amezeien, taulet evez breman :
Gant poan mar-g-hellet fiout en ho prassan mignon,
Betec ho mevel en ty a so hoc'h espion.

Na d'ar bourg evit affær, nac en quær d'ar marc'had
N'efet quet, var ma c'hredi, hep eur certificat;
Da ober hoc'h ezomou, mar pellaet deus an ty,
Hep cavout eur passeport, eus urz d'hoc'h arreti.

O Goezen al *Liberte*, merq a revolterez,
Greffet oud divar, hini ar barados terrestr;
Aboue ma'z oud bet plantet en bro ar Francisien,
Eo commencet o maleur hac emaint er *chaden*.

Pes differanç, ma brois, entre'n amser a ren
Hac an hini voa en Franc pemp bloas a so hepquen!
Entre an han hac ar gouan, entre'n nos hac an de,
A so neubeutoc'h, m'en tou, peb-hini a vel se.

Ma ve breman da gommanç ar revolution,
Den ne garfe chanch roue, nac he religion :
Cals o deus prenet squient, hac a anzav erfad
E voa guell da bep-hini chom en he guentan stad.

Er maleur eo e santer pris ar brospérité,
En scol an experianç e comprenfet ive.
Oc'h eus gret un troq fachus o clasq mal-a-propos
Un egalite noazus hac eul liberte faus.

En Franc, eme ar proverb, ne voa esclav ebet;
Mæs bepret an dud mechant a gav da lavaret
E ve ar prinç un tyrant, ha pa vent en he blaç
Int ar c'hentan tyrantet ha crioc'h evit chass.

Freit feuillen, sellet ho pro en he fleur, en he gloar,
Dindan an oll Bourbonnet dalec Heri pevar
Betec he vap bianan, ar merzer oc'h eus gret,
Ar sujet deus hon daerou hac a rebech ar bed.

Biscoas eur bopl fideloc'h ne voa bet d'he brineet;
Biscoas ne voa rouane guelloc'h d'o sujedet;
An oll a dougue avi da Franc ha d'he roue,
D'he c'honverç, d'he abundanç ha d'he frosperite.

O Roue carantezus! birvi a ra ma goad,
Louis, pa sonjan ennoud: te voa roue ha tad

Assambles d'ar Francisien, hac idol o c'halon
Betec an deiz milliguet deus o rebellion.

Franç a voa scol an enor, sejour ar joaüstet,
Grignol he amezeien, bro an dud a speret,
Magueret ar rouane; merc'h henan an Ilis,
Custum da rên en Europ pell so en he divis.

Evel guenan er jardin da gomposi o mel
E velet estranjourien hac a dost hac a bell
O tont en Franç da ober o academiou,
Ha da guemeret model memes deus he guisjou.

Ar c'honverç, an industri, an navigation,
A re d'an arc'hant ruillan en pep condition;
An oll o defoa labour ha bara da zebri,
Assuranç deus o moyen ha repos en o zy.

Mæs boneur ar Francisien, o freciussan graç,
Ar feiz catholig romæn a voa bet a viscoas
Seul religion o c'hontre. O deïou a vertu!
Amser a zoujanç Doue! p'eur e tistrofet-hu?

Allas! biquen, martese: eman en abandon
An ilisou dirapar. An exil, ar prison
A ra d'ar guir Bastoret bemdez disperissan,
Hac adieu d'ar gristenies a ben dec vloas aman.

Sauvach memes e vezor, rac n'ez eus espernet,
Na scolach d'ar yaouanquis, na couënt d'ar merc'het,
D'ar re-man ec'h inspirer art ar gorrupcion,
Hac er re-se e c'houezer tan ar rebellion.

Dre ar requisition ar grenardet hirie,
Casset d'ar scol ar muntrou hac an impiete;
N'o devo stad, na micher, na quen condition,
Nemert bezan hugunot, libertin ha fripon.

O cruellan planeden evidoc'h, Bugale!
Pebes dommach d'ar perc'hen, d'an oll pebes querse!
En diaves ar bresel, er guær persecutet:
Cetu eno ar gonid o credi tyrantet.

Caer oc'h eus dissimuli ha bezan fanfaron,
Ho speret a so diæs ha doaniet ho calon:
Dre forç ez oc'h citoyen ha non pas autramant,
A boan deus mil ac'hanoc'h unan a so contant.

Nos ha deiz ha da bep heur, var ar mes hac en quær
N'eus nemert displijadur ha lec'h a zisesper:
Jacobinet a zifun pa gousq ar chouantet,
Pa ve tranquil eur brovinc, un all so revoltet.

Eman guenac'h, ma brois, ar c'har arauc an dæn,
Ar masel var ho taoulagad, an treid o ren ar pen,
Ar vatimant hep pilot, hac ar bed ranverset;
Biquen gant ho republiq evurus ne vefet.

A viscoas em eus elevet eo difficil laqat,
Pa ve re o commandi, en nep lec'h an urz vad;
Sul-vui a ve a væstrou, sul-vui a zispignou,
Sul-neubentoc'h a accord, sul-vuioc'h a grimou.

Dalec ar gommançamant lennet betec ar fin
Quement crim so commetet, quement torfet indign

En amser ho rouane, en pad mil bloas dioustu;
Ar republik en deus gret en tri bloas dec guech mu.

Ne ouffe den lavaret, rac urz so da devel,
An nombr a dud so lazec dec vloas so er bresel,
Nac ar re so da lazan evit caout neubeutoc'h
A lodennou da ober pa arruo ar peoc'h.

Pa vo achu ar bresel, ne vo quet ar garnach,
Rac un all a gomanço gant muioc'h a arrach;
Pa vo partajet ar pris deus an injustiçou
Piou a sonch guenac'h neuse en deo ar profitou?

Oll vadou an dud-chentil ha re ar veleien
A vo d'an noblanç nevez, ar paour n'en deo esquen;
Den ne vo pinvidiqoc'h, a viscoas eman'r gont,
Madou drouq-acquisitet jamæs ne brospèront.

Eur c'hoat carguet a laeron a cerner a bep tu;
Gant armou tud ar c'hontre a red da ober hu;
Mæs, allas ! penaus herzel, ma Doue, penaus pad !
En Franc a so a laeron eur rouantelezat.

C'hoas al laeron evite da vezan tud ingrat,
A ra goude ar pillach entreze justiç vad;
Mæs en Franc eo autramant, rac an eil laer a dle
Quent ma vo egalite adlaeres eguile.

Eur veach deut an decret ma vo an oll egal,
Ar madou a laer eur rum, o deus droat ar re all
D'o adlaeres adarre : den ne hell assurin
An dra-se a so d'ac'h-hu, an dra-man a so d'in.

Mar da madou ar c'hlerge, an Ilis, an noblanç
Gant canfartet an distriç, c'houi, pa guevfet ho lanç,
Var an distriç e-unan, ho po lec'h da gouezan,
Da c'hortos ive, d'ho tro, eur rum all d'ho pillan.

Marchan renquet ordinal ha mont en ho tespit
D'ober en em vassacri hep enor na profit :
Ar c'hroq a ve d'ar c'hrenvan, ha c'houi, evit loden,
Pa vezo lonquet ar pesq, a lipo ar groguen.

*Furtum, homicidium, adulterium inundaverunt terram;
et sanguis sanguinem tetigit. Jer.*

SEIZVET GUIRIONE.

FIDELITE D'AR GUIR DOUE.

*Propitius sit nobis Deus : non est nobis utile relinquere
legem et justitias Dei... ut eamus alterà viâ. 1. Mach. 2.*

Ordinal ar Francisien a voa bet reputet
Da gaout eur speret volach; mæs biquen ne gredjet
E vijent quen dirèson da choas evit mestros
Quellies a sclerat da revinan o bro.

Ma Doue ! pes dallente eo hini ar gommun !
Heuill a ra ar gaus fallan ha caout outi rucun ;

Dre forç ec'h a d'ar bresel ha gratis d'ar gombat
Hep gout dre urz pehini, evit piou na perac.

En despet d'o santimant e tougont an armo,
Ha couscoude, gant eur guir, o c'hasser d'ar maro
Evel ar griminalet, mouchet o daoulagad,
Pe evel tud counaret n'o deus mui a sans vad.

Tud variant hac abof, quemeret eur parti,
Disquet evit piou mervel, evit piou combatti;
N'ho poa-hu quet eur roue hac eur religion
Da souten ? D'o reclami ha c'houi a vo poultron ?

Goude ar portret fidel am eus gret deus a Franc,
N'oc'h eus affer da selaou nemert ho conscianc;
Mar queret he c'honsulti, e responto d'ac'h cren :
« Enor ar religion, droajou ar gurunen ».

Ho roue var an douar, hac ho Toue en êe
A outrajer dirazoc'h. D'ac'h eo venji anê;
Tron heritour Sant-Louis, Feiz an Ilis romæn,
Ho Toue hac ho roue, n'oc'h eus quen da zifen.

Dindan domination muntrerien ho roue,
N'en deus hini ac'hanoc'h assnr deus he vue;
Ha neubetoc'h assuret da gonservi ho tra
Gant tud n'en dint revoltet nemert evit pilla.

Mæs hac ho pe ar bed-man da bartaji gantê
Petra a servijo d'ac'h, mar collet hoc'h ine !
Or daonet sur e vefet, mar heuillet maximo
Ar vandrinet so breman o condui ho pro.

Ar buissanç tamporel, form ar gouarnamant
A hell varian, sivoas ! an Ilis, differant,
A die pad en peb amser, a gonven da bep bro,
Ha n'en deus silvidiguez nemert el lec'h ma vo.

En risq eta da vezan esclav d'ar republiq,
Dalc'het mad da vianan d'an Ilis catholiq :
Malheur d'ac'h anes honnes ! hac ar pezh so tristoc'h,
Quement a deui ho coude a vo goas ac'hanoc'h.

Ar vugale maleurus a so c'hoas da c'henel
A grio venjanç varnoc'h gant daerou eternel
Da vezan serret oute dor ar silvidiguez,
En default bete'r maro souten ar gristenies.

Ha pa ho pe mil buez e tlefac'h o livran
Quent renonç da Jesus-Christ a varvas d'ho prenan.
Sevel a ra blev em penn, pa sonjan e vefet
An divezan christenien dimeus ar Vretonet.

O Doue oll-galloudus, discarguet assambles
Varnomp, mar deo necesser, bresel, bocen, quernes;
Hon c'horfou a amanto. Contantet ho justic,
Mæs lest guenimp ho toujanç ha feiz ar guir Ilis.

Penaus ! renonç a ra'n oll d'ar guir religion,
Gant aon deus un dornad tud so er Gonvansion !
Piou a ro d'ê an droat-se quen extraordinal,
Da laqat ar Francisien en renq loenet brutal !

Penaus ! tud civiliset chom hep religion,
Hep Doue na sacrific, hep templ nae oræson !

Pe Franc a so en ifern, pe an ifern en Franc ?
N'hell quet bezan concevet un disurz quen estranch.

Pénais ! n'en deo an Drindet na gloar na meulodi,
Na Jesus adorator, na servijer Mari ?
Gant sin ar redemption ne vo tal den marquet ?
Daoni'n oll corf hac ine eta so lavaret !

Neuse, en guis d'an oc'hen pleguet dindan ar ieo,
Pe ar mul dindan he sam, nemert d'an taul ne gleo,
Ho cuelin da virviquen ! o pebes dismegañ
Da vugale an Ilis, da dud ganet en Franc.

Eur gouardis quen infam a laqo var ho compt
Maleur an amser bresant hac an hini da zont.
An histoar a rapporto ha lec'h vo da gredi
E voac'h deus ar Francisien hac ar fanq hac al li.

N'on ped roue d'ho sicour a glevan so armet,
Hac evel tud so dallet, sivoas ! e preferet
Mestroniach al laeron, eur republiq paën
Da autorite ho princ legitim ha christen.

Sonjet erfad ne istim tud ar Gonvansion
Evit netra, er bresel, buez dec million ;
Na goude ar peuc'h ive ne vo quet guell garant
Na guell gred deus ar vuez dindan pemp cant tyrant.

Gonid quentan, coll goude, caout a refet trec'h par ;
Goude quement a gombat ha quement a victoar,
Rod ar fortuu a droïo, hac e vefet goassan :
Briattan re assambles so diaes da stardan.

Prosperite ar c'hrimou ne bad quet ordinal ;
Goude m'ho po servijet da gastian re all,
Ar voalen a vo briset gant Doue e-unan,
He vrec'h en em zisarmo hac ho taulo en tan.

Evel ar foeltr o couezan, e lesfet var holerc'h
An natur epouvantet, hac en douar ar c'herc'h,
Ho corfou hep sepultur, ho memoar excret
Hac ar bed oll ravisset d'ho cuelet perisset.

An nemorant ac'hanoc'h dirollet var al lan
Hep eur guennec, hep bara ; ha, martese, hep tan,
Hep guele, ty na toën, nemert gant eur bonet
Ha goezen al *liberte* ne vefet abritet.

Cetu an oll avantach ho po bet o selaou
Cabitenet ar revolt ha doctoret ar gaou !
Prometet mad o devoa, quent na vijent achu,
E rentjent Franc eur veret hac ar vro en ludu.

Ho mestrou ous ho cuelet er pare divezan,
Eur mor daerou o redeq, netra quen da billan,
Gant hoc'h aour hac hoc'h arc'hant a guemero an tec'h,
Hac ho leso, ma brois, hoc'h-unan dindan bec'h.

O Francisien affliget ! ganet oc'h en heur fall ;
Da derri ho planeden, quemeret un hent all
Assuretoc'h d'hoc'h ine : rac evit ho pue,
Chommet en tu ma querfet, risq so en daou goste.

N'oc'h eus nemert eur voyen da hellout reperi
Hoc'h avantajou collet, gret impli anezi ;

Antreet en ho tever, retornet da Zoue ;
Hac impliet hoc'h armou en servich ho roue.

Hac ho pe en nep feçon gret gaou na prejudic
D'an noblañ en o madou, ha d'an dud a Ilis,
Ho pardon a so assur, pa vo ar roue mestr :
Graç Doue hac an amser a reparo ar rest.

An oll dud a so gouiec n'oc'h eus roet na lec'h
Nac occasion d'ar revolt, ez eo en despet d'ec'h
Oc'h oblijet da varchan dre requisition,
Ha da serviji cōntrel d'hoc'h inclination.

Biscoas quell deut d'an noblañ, fideloc'h d'ar roue,
Preciusoc'h d'an Ilis ne voec'h en ho pue
Evit breman, mar quēret distrei a greis calon
D'ar gaus vad, ha dilesel parti an drahison.

Peguen citoyen bennac e vec'h bet betec enn
Ne gouezo quet, m'en assur, eur bleven deus ho penn,
Contrel da gaout rebechou, ho po mil amitie,
Hac alafin mil bennos digant tud ho contre.

Massacri tud a henor en em rent libramant
Eo micher an hugunot hac hini an tyrant ;
Ober vad ha pardonna eur bopl paour egaret
Eo maxim an Aviel, dever ar Bourbonnet.

Francisien, querent, breundeur, ha christenien omp oll ;
Quell eo distrei divezat evit mont crenn da goll,
Ha mervel evit mervel, mar deo necesser se,
Gant guiton ar fleur-de-lis marvomp evit ar Fe.

Aboue ma so bet renquet caout recours d'an armou
Evit difen ar justic ha poursniv ar c'hrimou,
Biscoas caus legitimoc'h ne voe bet soutenet,
Biscoas ne voe da venji quellies a dorfet.

Ha possubl ve, Bretonet, e velfac'h en ho pro
Renian ar guir Doue, dispen he auterio,
Egorgi he vinistret, tanan, pillan, violi
Ha chom ho tivrec'h croaset hep en em opposi ?

Piou a velo hep murmur spolian he zanve
Anlevi he yugale, dibobli he gontre ?
Ar roue assassinet, hac he vap er prison,
A rer dezan he broces quent an oad a rēson !

O Louis, ma frinç iaouang, o noplan crouadur
Deus a raç ar rouane ! pebes displiadur
Am eus-me ous ho cuelet er prison o voela,
En renq ar grimalet ! gant poan oc'h eus dec vloal

Ho tad paour hac ho mam guer, ho moereb vertuzus
So deus ho huanadou ar sujet lamantus :
Collet o deus o buez hac ho leset minor,
Ar Brovidañc e-unan a vo ho culator.

Sec'het ho daerou, ma mestr, ha finisset ho caon :
Ni varvo, pe, hep dale, ho tyrant d'an traon
A servicho da scabel d'ac'h da vont var ho trōn
Da laqat ren ar justic hac ar religion.

Mæs petra a glevan-me ? Eur poeson lent ha ien
A red en ho coaziet hac a fix an termen

Deus ho puez innoçant ! Ma dorn arret aman !
An natur so revoltet !... achuomp da riman.

Ma Doue ! n'ouzon pelloc'h petra da requeti
Pe patiantet da souffr, pe nerz d'en em venji ;
Couscoude reson, enor, justic ha conscianç,
Oll a eur vouez a griont : Venjanç so red... venjanç !

Ne gavfac'h quet eur famill var douar Breiz-Isel
N'eman en affliction : c'houi a coll ho puguel,
Me ma zad, te ta bried hac un all he vara ;
Peb-hini en he guever en deus lec'h da voela.

En eur maleur quen commun e vije gret guechall
Processionou publiq ha iuniou general ;
Guelet e vije bemde ar bopl en ilisou
Prosternet bete'n douar ha fontet en daerou.

Mæs n'o deus ar Francisien pelloc'h permission
D'en em gonsoli memes dre ar religion ;
Poent eo eta, ma brois, hac en tu all da goulz
D'an oll redeq d'an armou, pa n'o deus quen recours.

Mar boe biscoas un dever d'eur bopl en em sevel,
En em armet, Francisien, poent eo en em disquel :
Pep christen a so soudard pa attaquar ar Fe,
Pep soudard so oblijet da venji he roue.

An oll so interesset : ar gaus a so commun ;
N'en deus mui da venaji na buez, na fortun ;
Red eo en em disober, cousto d'ac'h a gousto,
Deus adversourien Doue, ha bourrevien ho pro.

Biquen anes eur roue Franç ne vo en repôs ;
Anes ar Feiz catholiq birviquen barados ;
Maleur eta d'an den lâch a drahis he roue,
Brassoc'h maleur d'ar c'hristen a renonç d'he Zoue.

Ar mor a vo hep mare, hac an heaul hep sclerder ;
Ar steret var an douar, hac ar pesquet en aer,
Quent ma chaneh ma santimant na ma religion :
Guir catholiq em ine, royalist em c'halon.

Bezan so c'hoas Bourbonnet, me vel unan ane
Instruet evel David dre an adversite ;
Religius eveltan, ne ouffen quet en nac'h
Evit hon princ naturel. Vive Louis trivac'h.

Allon ! Bretonnet vaillant, gant ar gocarden guen
Hac armet a sin ar groas, pareisset en dachen :
C'hoant en deus an Directoar ec'h afec'h d'ar bresel,
Eet, mæs evit he valeur : bezet bepret fidel.

Pa vefet var ar frontier, redet en eur vanden
Da gavout ho cuir roue catholiq ha romen,
Eman gantan ar victoar pell so ous ho quervel,
En un dorn ar vas royal, en all an Aviel.

En despet d'an drouq-speret ha d'he legiono ;
Querset oll gant confianç, an hugunot d'he dro,
A velfet leun a spouron o quemeret an tech,
Hac o c'houlén d'an daoulin he vuez diguehec'h.

Quemeret evit divis Doue hac ar roue ;
Da ditrou quen enorabl conformet ho pue ;

Bevet en doujanç ar mestr, ha difennet he gaus ;
Trist eo gonid ar victoar ha coll ar barados.

Fin eur soudard hugonet eo he zaonaton ;
Lazet eo en e bec'het, quiriec a drahison ;
Mæs c'houi memes o vervel a vo victorius,
Ho recompanç assuret, ho maro precius.

O Doue an armeou, hon Añtron souveren,
Hep assistanç pehini e combattomp en vaen,
Roet ho pennos d'hon armou, soutenet hoc'h Ilis,
Ha conservet var an trôn hiritier sant Louis.

Gret santout ho puissanç d'adversourien ho cloar,
En ho presanç, mar queret, e fontoint evel coar ;
Gret santout ho madelez d'ho pugale fidel,
Roet peoc'h en pep amser da Franç, da Vreiz-Isel.

O douar a Vreiz-Isel ! o bro quen desiret !
Portion quen precius ! denved abandonnet !
Avanç a ra ma deiou, eur chanç, mar ho cuelan ;
Mæs mervel a rin contant, m'am be ar mennat-man.

Franç a so c'hoas catholig ; an templou digoret ;
Ar bopl a red d'an Ilis ; rentet ar bastoret ;
Ne glever a bep coste nemert hymnou a joa,
An *te Deum laudamus*, vive, vive le roi.

Biniguet ra vo an heur m'am bo ar c'helou-se !
O ma Doue, disposet deus ma deiou neuse
Ne vo quet hirroc'h beach da vont d'ar barados,
Pe me iel dre Vreiz-Isel, pe me iel dre Vro-Saoz.

Det nobis Deus jucunditatem cordis et fieri pacem in diebus nostris. Eccl. 50.

AVIS D'AR BOPL FIDEL

EN PAD AR BERSECUTION.

Viriliter agite, et confortetur cor vestrum; omnes qui speratis in Domino. Psalm. 30.

O ma orphelinet paour ! o ma faroussionis !
Mar couez entre ho taouarn ar c'hantiq-man en Breiz,
Disquet principalamant ha gret attentions
D'ar pezh am eus lavaret var ar religion.

C'houi oll, tadou ha mammou, mestrou ha mestreset,
N'ho calvin quet d'ar bresel, me voar oc'h oblijet
Da c'hom var ho tieguez. Mæs, m'ho-supplijer guez,
Roet deus an oll vertuz an exempl hac' arosquer.

Ne zispartiet biguen, arruet a garo,
Dious feiz an Ilis romen. N'ez eet james vardro
Officou an touerien, ho pugale na c'houi ;
Pastoret oc'h d'ho-famill ; hoc'h ilis eo ho ty.

Da sul, en couls an offic, en commun gret peden ;
Goulennet participan en quement offeren
A celebrer en deiz-se. Dreist pep tra gret requis
Diou pe taer guech ar sizun d'ho tud ar c'hatekis.

Badezet ho pugale ha gret d'ê abredic
Anaout ha bezan fidel d'an Ilis Catholig,
Apostolig ha Romen, ermes a behini
Eo impossubl d'ar C'histen en em savetei.

D'ar scoliou national, na da scol an intru
Ne gasset quet aneze. N'en deo quet absolu
Red deze bezan savant : mæs, carout o fere'hen
Ha goût serviji Doue, n'o deus affær a guen.

Pa gavint tud vertuzus, lest-e da zimezi
En presanç Catholiquet ha gant ne vo hini
Deus an ampechamanchou oc'h oppos aneze,
Sauf da suppli formou an Ilis goude se.

Observet an vigilou evel ar c'hoarais,
Ha quement solemnite a virer en Ilis,
Non pas an hugunodach a rer en decadou,
Rac n'heller quet assambles serviji daou Autrou.

D'en em reconcilian, laquet ho poan da glasq
Eur belec fidel bennac, hep gortos amser Pasq;
Ha ma n'ez eus, dre valeur, hini dre ar c'hontre;
Communiat a galon, covessaet ous Doue.

Evel ar Sunamites pe maquez Jerico,
Roet support hac assistanç; mæs serret ho gueno.
Bez' ho po da repui, martese, profetet
Ho tigollo amplamant. Ma entent a dleet.

Hac ho pe da restoli memes intantion,
Ne brenet quet a vadou digant an nation.

Dias eo restitui goude se d'ar perc'hen;
Madou goall acquisitet ne bröspèrent gant den.

Ne vanquet quet da baean ho preudeur en arc'hant,
Lest ar baper a goste. Er feçon m'oc'h eus c'hoant
E ve gret d'ac'h, gret ive. Miret ho mandajou
Da baean ar republiq, pa ne ro quen gajou.

Evitet, mar be possubl, ar bersecution;
Mæs pa vefet arretet, gant resination
Eet dirac ho parnerien. Ho cuellan avocat
Eo ar mestr a servijet hac ho conscianc vad.

Ne droublet quet ho speret da essa gout penaus
Na petra da lavaret evit difen ho caus.

Prudent evel ar serpent, douc evel ar goulmet,
Pardonnat a greis calon, hep discuill den ebet.

Lavaret oc'h Catholig, ha ne lavaret quen;
Ber ha ber, hac hep respont da questionou væn,
Goulennet digant Doue, herve he bromesse,
Inspirant d'ac'h respontchou convenapt en heur-se.

Mar bec'h neuse condaonet en tribunal impi;
Comsomp guell, mar bec'h cavet dign a verzerenti,
O Christen predestinet, rentet gloar da Zoue,
Ha gret generusamant sacrific ho pue.

Me a vel an êe digor prest d'ho liguemeret.
Pebes joa ! pebes triumph ! deja eus preparat
Un tron evit ho receo. Courach, servijer mad
N'ez eus saler hep victoar na victoar hep combat.

Ar vuez ne dal pelloc'h ar boan d'he menagi ;
 Evit ar pezh so breman a blijadur enni.
 Red vo d'ac'h mervel un deiz, ha biquen, me so sur,
 Ne ouffac'h caout d'hoc'h ine barados quen assur.

Gant joa e tlefac'h dridal, ha non pas bezan trist,
 Souffr evit ar virione hac evit Jesus-Christ ;
 Rei buez evit buez. O mil bennos en heur
 Hac evurus er momet m'oc'h eus eur sort faveur !

Ma ve capabl an Aelez da goncev jalousi,
 E vent guelel avius deus ar verzerenti ;
 Rac deus ar guir garante eo ar merq visiplan,
 Hac en gloar ar barados an degre huellan.

Couls eo ar verzerenti evel ar vadiziant,
 Hac enoraploc'h memes. Mar deus poan violent
 Da souffr, n'en deo quet padus. Ar c'hraç, trec'h d'an natur,
 A chanc'h alies memes ar boan en plijadur.

Eur pezh terrupl a etof a-ro eur marc'hadour
 Evit caout en pacamant eur pezh bian a aour ;
 Ha c'houi, evit eur momet a boan var an douar,
 Ho po en eternite eur gurunen a c'hloar.

Hastet eta ; bugale, disposet dre avanc
 Pep tra evit ar gombat. Reglet ho conscienc ;
 Pedet Doue da derri ho coall habitujou ;
 Renoncet, ispicial, d'hoc'h attach d'ar madou.

Antretenet, entrezoc'h ar charite vrassa ;
 Amser ho curunamant, martese, a dosta.

Ancouraget ho preudeur, ha soutenet ar re
 A so, sivoas d'é! risquet da drahissan ar Fe.

Un dra am eus da c'houlenn hac a recommandan :
 Bisitet, me ho suppli, exortet ar re glan ;
 Exercet en o c'hever an offic a bastor :
 Un amezec vertuzus so breman un tensor.

Allas ! pa deu ar c'hlenved eo brassan an danger
 Da vont hep Sacramanchou. Difficil e quever
 Eur belec mad da ober eur guir govision,
 Ispicial en amser ar bersecution.

Me voar erfad, en faveur eur paour agonisant,
 Gant aon na zisesperre, an Ilis a gonsant
 Ma teuyo d'he absolvi eur belec sermantet,
 Pa'z eo impossibl dezan caout hini all ebet.

Mæs nemert an absolver, hep nep Sacramant all,
 Ne hell an den-se receo digant ar belec fall ;
 Ha c'hoas divoal da vezan pervertisset gantan,
 Na rei sujet da gristen d'en em scandalizan.

Eur princ a voe guell gantan guechall souffr ar maro
 Ha cedi he gurunen, evit ne voe receo
 Ar gommunion deus a zorn eur belec heretiq ;
 Graç d'an nep a laquayo he exempl en pratiq.

Evidoc'h-hu, pa deuyo clenved d'hoc'h afflijan,
 Sonjet dindan dorn Doue en em humilian,
 Ha goulennet digantan graç ar Sacramancho,
 Mar n'ho pe quet en effet ar boneur d'o receo.

Ar maro hep eur pilot a so eur goall bassach.
Nac a hini, ma Doue ! a ra breman naufrach !
Mæs, hep caont presumption, m'ho conjur, me ho ped,
Ho Tad a vo ho parner ; ne zisesperet quet.

En meritou Jesus-Christ laquet ho confianç ;
Gant eur gred evel hennes bezet en assuranc.
Fidel oc'h bet d'he Ilis, fidel e vo d'he dro :
Misericord a glasquet, misericord ho po.

Mæs ar gontrition barfet, en default absolver,
Dreist peb tra so necesser. Allas ! ha ne hell den
Meritout eur sort favenr ; mæs den ne dle ive
Disfiout deus a buissanc na madelez Doue.

En speret a binijen recevet ho clenvet,
Da expian pec'hejou ho puez tremenet.
Redoublet hoc'h esperanc, nevezaet ho Fe,
Ha gret alies actou a garante Doue.

Hep gortos ne ve arru hoc'h amser divezan,
Pa vo poent testamanti, goulennet da guentan
Sermant deus ho pugale, ma vint a re da re
Catholiquet evel doc'h ha fidel d'ar guir Fe.

Pa deuyo d'ac'h anduri caouajou poan grevus ;
En ho torn ar grucifi, poquet da dreid Jesus,
Hac ho poanniou unisset gant re he bassion ;
En em exercet neuse d'ar guir gontrition.

Lavaret gant confianç ha gant eur feiz parfet
D'ac'h oc'h-unan : Ma Doue, pa n'am eus eur belec,

Ec'h anzavar ma c'hrimou ha ma direglamant :
N'am lest quet da berissan en default Sacramant.

Evel ar paralitiq, d'am goalc'hi er piscin
N'em eus den ; mæs, ma Doue, c'houi so eur medecin,
Hep appliquan remejou c'houi rent salo an oll :
Sellet ousin a druez ha n'am lest quet da goll.

Me ho car a vir calon hac a so glac'haret
Da vezan bet eur momet memes hep ho caret.
Ho madelez infinit, ma buez sacrilech,
Ho touçder ha ma maliç am eston bep eil guech.

Penaus em eus-me gallet hoc'h ancouat, ma zad ?
Ah ! n'ho poa gret em c'hever biscoas nemert peb mad ;
Ma c'hroui, ma c'honservi, ha digass d'am prenan
Ho Map, deus ho complesanc an'objet santelan.

C'houi eo an urz eternal, ar Mestr oll-buissant,
Sourcen ar berfection, ha me poultr ha neant,
Am eus troublet an urz-se, manquet d'ho serviji,
Ha negliget d'ho caret evel un etourdi.

Pardon, va Mestr biniguet : ar vez, ar garante
Hac ar remors assambles a occup ma ine.
Me voar e ret eur miracl o tont d'am acquitta ;
Mæs eur miracl evidoc'h a so neubeut a dra.

Castiet, sqoet er bed-man ; n'en deo quet ho tauliou,
Mæs aon d'ho coll, ma Doue, a ra d'in scuill daerou :
Chatimant a veritan, a acceptan memes,
Rac ho justic a garan evel ho madelez.

Sonjet on ho crouadur, ha dre adoption
Unan deus ho pugale ; ma c'hred , ma c'haution
Eo Jesus-Christ e-unan , ho Map muian-carek :
N'en doc'h evit refusi netra en e requet.

Nan , birviquen , ma Doue , deus ho misericord
Ma ine ne zisesper , pa'm eus evit support
Jesus , ma mediator ; mar deo bras ma fec'het ,
Brassoc'h eo he veritou. Ma accord a so gret.

Resolvet on a vreman , cousto d'in a gousto ,
Da dremen en ho servich ar rest deus ma deizio.
Ma sicouret , m'ho suppli , da chom bepret fidel ,
Evit , en ho carante , bevan , souffr ha mervel.

Graç d'imp , en heur divezan , da gaout en hon c'halon ,
Abeurs ar Speret-Santel , eur sort contrition.
Goulennomp-hi a vreman , dre bedennou fervant ,
Hac evit mervel erfad , bevomp santelamant.

Pedet evit an Ilis , iunet , gret œuvrou mad ;
An dorn e deus ho sqoet a hell c'hoas ho cuellat.
Secrejou ar Brovidanç a so cuzet ousoc'h :
Pa ve brassan ar bresel , e ve tostan d'ar peoc'h.

Pa sonjan ho cuelin c'hoas , gant joa e teu ar glis
Da c'hlebian ma daoulagad ; mæs , allas ! evel pis
E red ane an daerou , pa sonjan quimiadan :
Pardonet din , va Doue , ar sempladurez-man.

Da soulaji un neubeut ma glac'har naturel ,
Greomp en presanç Doue promesse mutuel

Da offr hon sacrificou ha bemde oræson ,
Me evidoc'h , bugale , c'houi evit ho Person.

Ne heller hon separi an eil deus eguile
Nemert evit un amser. En Barados Doue
Hep dale en em velfomp , ha cetu tremenet
Exil , daerou , nec'hamant , oll trubuillou ar bed.

Courach'ta , nombric bian , ho Tad a blich gantan
Rei d'ac'h he rouantelez. An den just er bed-man
A renq bezan eprouvet , evel ma renq an aour
Tremen dre tan ar fournies. Adieu , bugale baour....

En hano an Tad , ar Map , hac ar Speret-Santel ,
Un Doue en tri Ferson , a behini an eil
En deus souffret evidomp maro ha passion ,
Recevet , deus ma exil , ma benediction.

FIN.